



HAL
open science

Ar brezhoneg e bed ar bagadoù : Implij ha sell ar brezhoneg get ar sonerion hiriv an deiz

Elouan Le Sauze

► To cite this version:

Elouan Le Sauze. Ar brezhoneg e bed ar bagadoù : Implij ha sell ar brezhoneg get ar sonerion hiriv an deiz. Literature. 2017. dumas-01668621

HAL Id: dumas-01668621

<https://dumas.ccsd.cnrs.fr/dumas-01668621v1>

Submitted on 20 Dec 2017

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - NoDerivatives 4.0
International License



Edan siell Skol-Veur European

Skol-Veur Roazhon 2

Labour Master

**Ar brezhoneg e bed ar
bagadoù**

*Implij ha sell ar brezhoneg get ar
sonerion hiriv an deiz*

Elouan LE SAUZE

Edan renerezh : Ronan AR C'HOADIG

2016 / 2017

Trugarez :

Trugarez da Fañch BROUDIG evit e sekour àr sevel ar c’houlennoeg. Trugarez da Vonig FRAVAL ha Sonerion da vout soutennet ac’hanon a-hed ar labour en ur reiñ din kement diell a c’houlenner. Trugarez da bPatrik SICARD evit bout digoret din dor Dielloù-departamantel-Penn-ar-Bed evit studial niverennoù kozh *Ar Soner*. Trugarez da tout ar sonerion o deus bet respontet d’ar c’houlennoeg ha bout bet dedennet get ar labour. Trugarez da vrezhonegerion Kerlenn Pondi, da Yannick AUDRAN ha Alan BUHE evit ar pennadoù komz. Trugarez da vBagad Sonerion An Oriant evit bout sekouret ganiñ. Trugarez da Riwal Corbel evit bout heuliet ac’hanon àr danvez ar statistikoù, da vMaxime CRAHE ha Brewen FAVEREAU evit o demeger. Ha trugarez da Ronan AR C’HOADIG evit bout renet ar labour-se.

Digoradur

Ar bagadoù a zo daet da vout hiriv an deiz dor ar sonerezh breton àr ar bed. Mil anavet eo bagadoù èl hani Lann-bihoue, a-drugarez d'o fomponioù ruz ha da ganenn Alain SOUCHON, hani Gwened, a-drugarez d'ar c'honkour bet gounezet er skinwel, pe c'hoazh hani Kemper evit e ugent maout bennak. Hir eo bet hent Bodadeg ar Sonerion¹, kevredigezh meur ar bagadoù, evit bout ken brudet. Krouet eo bet ar strolladoù kentañ da vare an eil-brezel bed hag e-pad hir amzer eo chomet stag skeud ar c'henlabourerezh hag ar vroadelouriezh àr chouk ar bagadoù hag o c'hrouerion. Aozet a oa bet ar BAS àr stumm ur gevredigezh get Polig MONJARRET, Dorig LE VOYER hag o c'henseurted get ar pal saveteiñ hag adnevesaat sonerezh Breizh met ivez hengoun ar vro, da lâret eo an dañsoù, an dilhad hengounel met ivez ar yezh, ar brezhoneg.

*« Un sonneur, tel que nous le concevons, doit être un Breton complet, intéressé par tout ce qui est breton et prêt à défendre tout ce qui l'intéresse, autant la langue bretonne que les intérêts économiques ou culturels, voire même simplement pécuniaires de nos compatriotes »*²

*“E penn kentañ ar gevredigezh e oa pouezus-tre ar brezhoneg.”*³ Èl emañ bet kontet deomp get Vonig FRAVAL, renerez Sonerion. Gwir e veze kavet brezhoneg e pep lec'h ; en un nebeud bagadoù, hani Rostren pe hani Boulvriag da skouer, e veze graet tout e brezhoneg. Er stajoù hañv e veze roet kentelioù evit deskiñ brezhoneg d'ar sonerion yaouank. Kavet a veze pennadoù e kelaouenn ar gevredigezh, *Ar soner*, kentelioù brezhoneg a veze kavet a-barzh ivez. Ger-stur ar gelaouenn-se a oa “Traoù breiz a zo hon traoù”. Met tamm ha tamm e tremen an amzer hag e chañj an traoù. Ar vuhez sokial ha c'hoantoù ar yaouankiz a zo bet kemmet e-pad eil hanterenn an XX^{vet} kantvet, ken m'emañ daet ar vrezhoneg da vout yezh an amzer gozh, ar beizanted, ar “plouked” ha dilezet eo bet er vuhez foran get al lod vrasañ ag an dud, er bagadoù memes, betek nac'hiñ ar yezh a-wechoù.

“Tamm ha tamm ha ne ouian ket a-gaoz da berak, eo bet lakaet anvioù an tonioù hag ar sonennoù e galleg. Met dre forzh oberse e vez kollet spered an tonioù. Ar brezhoneg en deus ur pouez a-ziàr ar feson da ganal. Dre selaou ar sonerion e vez gouiet ma ouiont

¹ A c'houde 2013 eo bet kemet anv an aozadur da Sonerion

² Polig MONJARRET, « Lettre à un ancien », *Ar soner*, 1959, n°113

³ Vonig Fraval

brezhoneg pe pas ha m' o deus sellet gost da perak e vez sonet an ton-mañ pe d'an nebeutañ istoer ar ganenn : ne lakont ket o notennoù e lec'h ma vez laket ar ganenn”⁴

Daet eo ar galleg da vout yezh ar bagadoù, kement-se zo bet lâret get Mikel PERON ivez :

“La lutte que nous menons pour le breton et la Bretagne doit être faite en français ”

Ar brezhoneg a zo bet tennet tamm ha tamm ag ar gelaouenn ha ne vez kavet ger hiriv an deiz. Kemmet eo bet ivez spered ar sonerion :

“ Dont a ra an dud davet ar bagad evit ar sonerezh dreist-holl, live ar bagadoù a zo ken uhel hiriv an deiz ken e tremen ar sonerion o amzer é soniñ ha n' o deus ket amzer pe n' o deus ket c'hoant nag ar pal da vont àr-raok get ar brezhoneg. C'hoarvez a ra memestra evit an dañsoù pe memes istor Breizh. Padal e oa frammet mat an traoù er gevredigezh e penn kentañ. Desket a veze ar sonerezh met ivez dañsoù, yezh hag Istor Breizh.

Hiriv an deiz pa vez aozet staj nedeleg Sonerion èl bep blez e vez goulennet get an deskarded piv a ouia dañsal, hag a-ziàr ar pevar-ugent a dud an hanter anezhe n' o deus ket dañset gwech ebet. Koulskoude int barrek da soniñ.”⁵

Hiriv an deiz eo bihan a-walc'h plas ar brezhoneg e bed ar bagadoù. Anv ar bagadoù a zo memestra e brezhoneg evit lod brasañ anezhe. Arabat eo bout **drougwelerion**, bagadoù'zo a zo chomet mennet get ar yezh c'hoazh, er Gerlenn Pondi da skouer e vez aozet tout e div-yezh brezhoneg ha galleg ha roet a vez, memes, kentelioù brezhoneg e diabarzh ar bagad. Dastumet hon eus ivez un nebeud testenioù lec'h ma vez lâret e ya an traoù àr-welat a-drugarez d'an hentennoù brezhoneg kinniget er skolioù dreist-holl.

Soner e bagad An Oriant e omp a c'houde 2008, hag a-viskoazh omp bet dedennet get sell ar sonerion ar bagadoù àr hengoun Breizh. Kav a reomp diaes gwelet tud dedennet ken nebeud get dañsoù pe yezhoù Breizh padal int barrek ober get ar sonerezh. Evit klask kompren ar perzhioù-se hon eus divizet studial a-dostoc'h liamm ar sonerion get ar brezhoneg. Gouestlet hon eus ar studiadenn d'ar brezhoneg nemetken, met en ur c'houzout ez eus ivez eus ar gallaoueg e Breizh.

Metoù ar bagadoù a zo unan eus ar re dedennusañ e Breizh. Ne vez ket kavet aozadur ebet arall get kement a-dud e skeudenniñ gwell ar sonerezh vreizhat er vro. Paravizet eo

⁴ Alan Buhe

⁵ Vonig Fraval

bemdeiz ar sonerion get an hengoun dre o benvegou ha dre ar mod sonerezh graet gete. Daoust da se e seblantont bout diseblant doc'h ar brezhoneg. Diar-se hon eus mennet studial kement-se. Ar labour kinniget da heul a glaskay respont d'ar goulenn, petra eo sell hag implij ar brezhoneg e bed ar bagadoù hiriv an deiz ?

Evit en ober e vo gwelet da gentañ penn kenarroud metoù ar bagadoù get istor Bodadeg ar Sonerion en XX^{vet} kantvet. Da heul e vo displeget penaos eo bet dastumet an data ha penaos eo bet kaset ar studiadenn statistikel da benn. Evit echu e vo embannet an disoc'hoù evit studial sell ar sonerion ar ar brezhoneg.

Digoradur	4
I- Istor Bodadeg ar Sonerion.....	9
1- Kenarroud Breizh a-raok an Eil Brezel bed	9
a- Kemmoù ar gevredigezh hengounel breton	9
b- An hengoun hag ar sevenadur	11
2- Deroù ha krouidigezh Bodadeg ar Sonerion	12
a- Kenvreurieh ar Viniaouerien.....	12
b- Krouidigezh Bodadeg ar Sonerion	13
c- Diorroadur ar BAS goude an eil-brezel bed.....	19
3- A vBAS da Sonerion	26
a- Diorroadur ar BAS goude ar blezadoù 1950.....	26
II- Ar studiadenn	30
1- Metodologiezh	30
a- Palioù ar studi.....	30
b- Ar c'houlennaoueg	30
c- Tretadur ar roadennoù	33
2- Ar boblañs studiet	35
a- Hollad ar boblañs	35
b- Ar vrezhonegerion oberiant.....	44

III- Implij ha sell ar sonerion àr ar brezhoneg	53
1- Implij ha deskadurezh ar yezh get ar vrezhonegerion oberiant	53
a- Deskiñ ar yezh.....	53
b- Ober get ar yezh	56
2- Sell hollad ar sonerion àr ar yezh	63
a- Er vuhez foran	64
b- Er bagadoù.....	69
Klozadur.....	75
Levrlennadur.....	76

I- Istor Bodadeg ar Sonerion

1- Kenarroud Breizh a-raok an Eil

Brezel bed

A-raok komz ha displegiñ istor ar bagadoù hag o c'hrouidigezh emañ ret deomp displeg kenarroud sokial ar vro, ha kompren penaos oa krog an hengoun da vont da goll e-mesk ar Vretoned etre deroù an XIX^{vet} kantved betek penn kentañ an Eil Brezel bed.

a- Kemmoù ar gevredigezh hengounel breton

Daet oa kemmoù a-vil-vern er gevredigezh europeat, hed-ha-hed an XIX^{vet} kantved. Merket eo kanvet ar romantelezh get ganedigezh ar gapitalouriezh, dasparzh nevez ar labour ha diorroadur ar greantelezh hag ar c'hêrioù. Get-se eo aet tamm-ha-tamm ar modoù kozh da goll, fin ar beizanted hag ar vuhez àr ar maez èl gwechall.

Hiroc'h oa bet evit an neventieziou tizhout Breizh, ken ma oa enchajet ar vro. Chomet e-pad pell ur vro paour meurbed, lec'h ma oa aozet ar vuhez tro dro d'ar labourerezh douar. Met daoust da-se e krog tro ar blezadù 1850 penn kentañ fin ar gevredigezh hengounel get ar vreizhiz, sikouret mat get c'hoantoù galloud publik ar vro da gallekaat ar Vretoned. Evit bout gouest en ober emañ bet implijet daou oustilh, an arme hag ar skol.

A-dal 1789, goude ma 'z eo bet krouet pennstruiennoù an ingalded hag ar vroad unvanet ha dirannapl, e oa kroget ar galloud gall da ziskar an dibarelezhioù rannvroel, en ur rediñ ar skoliatadur e galleg dre lezennoù Guizot e 1833. El ma 'z eo bet displeget get ur bern tud ha get labourioù gouestlet da zanvez ar skol e Breizh e stadimp just amañ perzh ar skol e diskar an hengoun hag ar yezh er vro.

Ar servij a zo bet ivez un oustilh efedus evit normalizadur ar galleg er vro hag un doare da unaniñ ar Vretoned yaouank a-dreñv d'ar baniel gall :

Dibosupl eo krediñ komz eus an arme hep soñjal doc'h ar brezelioù. Krizder an emgannioù a gas alies mat da varv pe da gloazadur ar broioù, ar stadoù, an dud hag ar

c'hevredigezhioù driest-holl. Ar vrezel vras a zo bet mantrus evit Breizh, miliadoù a Vretoned lazhet àr an talbenn. Kemmet eo bet ivez ar gevredigezh ha diorroet eo bet Breizh àr zu Bro-C'hall. Ar c'hentañ brezel bed a zo un troc'h e istor ar vro, kas a ray d'ar c'hemmoù ha d'an nevesadennoù teknikel e bed ar labour-douar met ivez àr ar modoù beviñ, get donedigezh an tredan, da skouer.

An etre-brezel a zo bet ur mare lec'h ma 'z eo bet dilosket ar maezioù breizhaat get ar beizanted. Aesoc'h-aesañ eo bet evit an dud fiñval a-drugarez d'an tren. Aozadur nevez an atantoù en eus kaset ur bochad tud da zivroñ betek ar c'hêrioù bras, betek Pariz dreist holl hag a zay da vout ar c'hentañ kêr Breizhaat.⁶

Staget a oa Breizh doc'h peurrest ar bed a-drugarez da ziorroadur an trenoù adal an XIX^{vet} kantved. En em lediñ a reas an hentoù-houarn e pep lec'h e bro C'hall betek Naoned e 1851 hag e Roazhon e 1857. Hired oa an hentoù àr-zu ar c'hornog evit tizout Kemper e 1864 ha Brest e 1865.

A-bouez bras eo bet divroñ ar Vretoned goude an C'hentañ Brezel bed. Aozadur nevez an atantoù a gasas an dilabour hag eo bet ret d'ar Vretoned mont davet broioù all evit kavout labour. An trenioù a sekoure an divroañ ha setu digoret ar vro d'ar c'hallaoued. A-drugarez da gement ez eus bet tud e veajiñ e Breizh evit testeniñ doc'h buhez ar Vretoned, kemeromp skouer Victor Hugo a ziskriv Breizh èl ur vro trueg pe c'hoazh tout ar liverion a zo daet da veviñ er vro, e Pont-Aven dreist-holl.

A-drugarez d'an tren nevez-se eo bet diorroet an douristelezh ha savet oa muioc'h mui a *station balnéaires* e eil hanter an XIX^{vet} kantvet. Un nebeud kerioù, èl ar Val-André pe Dinarz, a oa lusket get oberiantizioù nevez an douristed. Ar vakanserion-se a chome tud pinvidik ha minorel betek 1936 hag an araokadurioù sokial kaset da benn get talbenn ar bobl. Adal ar mare mañ e voe ur pouez ekonomikel ha sokial pouezus get an douristelezh. Savet a voe memes kerioù nevez evit degemer an dud, èl Sables-d'or-les-Pins bet krouet àr netra er blezadoù 1920.

Pouezus eo liammiñ an douristelezh-se get krouidigezh ar folklor breton e penn kentañ an XX^{vet} kantvet. Ret a o laoueniñ an douristed en ur zikouez dehe arouezioù, dañsoù ha dilhad ar vro. El ma ez eo bet graet evit diskouezadeg hollevedel Pariz 1900 e vez lakaet an hengoun ar vro da vout un arvest.

⁶ A-bouez eo gouzout an dra-se dre ma ez eo er gerbenn a vo savet kevredigezhioù lec'h ma vo savet an identitezh Breizhaat nevez.

Krouidigezh ar gouelioù folklorel e Breizh a gas da grouidigezh ar c'helc'hioù keltiek. Aozet a oa bet ar gouel folklorel kentañ get Théodore Botrel e Pont-Aven e 1905, *Fête des ajons d'or*, heuliet get krouidigezh ar *Fêtes des filets bleus* e Konkerne ar memes blez. A-drugarez d'ar gouelioù-se e veze gwelet muioc'h mui a strolladoù dañsoù pe kelc'hoù keltiek Breizh e tiorroñ get ijin ha diorroadur dañsoù nevez, dañsoù kof-ha-kof dreist-holl.

b- An hengoun hag ar sevenadur

Savet a oa buhez foran Breizh àr kodoù resis a-raok ar c'hemmoù komzet uheloc'h ha lusket a oa mareoù pouezus ar blez get gouelioù. Ma vehe evit ar gouelioù familh, an eostoù, kalañ gouiañ, Samain pe an Nedeleg e veze bodet an dud tro dro da ganenoù, sonennoù pe dañsoù met ar gouelioù brasañ ha pouesusañ a oa an euredoù. Aozet a veze un eured àr ur c'hwec'h pe pemp devezh bennak, lusket get kanerion pe sonerion “hengounel” : ur c'houplad bombard binioù aliesañ e Breizh-Izel. Un eured hep sonerion a lakae àr-wel paourentez ur familh, hag en tu kontrol e veze kavet daou pe tri gouplad en euredoù pinvidikañ. Get ar sonerion e vehe kaset an dud da glask ar wreg nevez en he zi evit kas anezhi davet an iliz, ar sonerion c'hoazh a gase bagad an eured d'ober tro tavarnioù ar bourk a-raok kas anezhañ e park lec'h ma veze debret. Tout ar pladoù a veze kinniget ha debred get ur son resis. Setu perak e vez komz eus son ar rost, ton ar boket pe ton ar mouchouer. En holl eh eus bet kontet 748 soner a vicher etre 1880 ha 1930⁷. Pouezus tre a oa ar sonerion e aozadur ar vuhez ha tud anavet a oant holl. E-pep parrez e oa ag ur gouplad sonerion. Tamm ha tamm eo bet kemmet ar gevredigezh hag ar c'hoantoù sonerezhel ivez. Goude ar C'hentañ Brezel bed eo daet bivioù nevez “modernoc'h” e Breizh, èl an akordeoñs pe c'hoazh ar saskofon pe an drompilh daet get an Amerikaned e Brest e 1917. Get ar binvioù e oa daet ivez dañsoù nevez : dañsoù saloñ, dañsoù kof ha kof a blije muioc'h d'ar re yaouank. Bec'h a savas neuze etre tu “ar re gozh” ar re fidel a kar d'an hengoun hag ar re “nevez” get an dañsoù nevez erruet èl ar fox-trot pe ar java. Buan e oa bet gounezet an enebiezh get tu ar re “nevez” hag emañ chomet ar sonerion mod kozh àr vord an hent. Daoust d'an dañsoù nevez e veze gouarnet get ar strolladoù nevez savet anvet *jase-band*, dañsoù hengounel breizh. Talabarderion zo èl August SALAUN o deus heuliet emdroadur nevez ar sonerezh hengounel, pand eo chomet lod brasañ anezhe skanket en o hengoun.

⁷ COLLEU Michel, BIGOT Laurent et LABBE Yvs, .Musque Bretonne *Histoire des sonneurs de tradition*, ed. Chasse-Marée-Glénat, 2008 p.16

2- Deroù ha krouidigezh Bodadeg ar Sonerion

Daet eo Bodadeg ar Sonerion da vout hiriv an deiz un aozadur anavezet mat e bed ar sonerezh breizhat, met hir ha kamm eo bet hent ar gevredigezh-mañ.

a- Kenvreurieh ar Viniaouerien

Ar sonerion divroet en em gave e mesk ur gumuniezh bretoned brudet e Pariz, e lec'h ma veze tu dehe soniñ tonioù kozh. Marcel AUDIC a zo bet ezel a gKAV a gont, en ur pennad komz⁸, buhez ar soner Job LE GUENNEC, en doa digoret un davarn e Pariz er blezioù 1930, *A la gaité bretonne*, e-lec'h ma veze laket an dud da zañsal dañs ar vro. Kavet a veze lec'hioù all e Pariz hervezañ, memes evit ar 14 a viz Gouere :

« Chez Postic Les Enfants de la Bretagne à Paris, boulevard Edgar QUINET. On commençait vers 15 heures jusqu'à 2 heures du matin. Et il y avait du monde ».

Listenn ar sonerion divroet da Bariz a zo hir, kavet a vez anvioù mil anavet e mesk ar sonerion el : Marcel RADENAG, GUIGENNO, LE BLOND, ar vreudeur DONNIO... . Ar sonerion mil anavet-se a yae da soniñ er metoù folklorel, soniñ a rae da skouer ar vreudeur DONNIO evit kelc'h keltiek Pariz. :

« Le cercle celtique de Paris organisait un bal tous les mois. A ce bal, il y avait un orchestre ordinaire et puis, de temps en temps, les binious. C'était les DONNIO qui jouaient là »⁹.

Tu zo da da soñjal ivez, ez eo a-drugarez d'ar sonerion-se e oa bet tu da sevel ha da grouiñ Kenvreuruezh ar Viniaouerion e 1932. Savet a oa ar gevredigezh-se diàr soñjoù ar folklor hag an emsav, ez-gwir e oa bet ken savet ar strollad get Hervé LE MENN ha Dorig LE VOYER, tud e darempred get ar meteier-se abaoe pell. Chomet a oa tomm o c'halon doc'h o bro, ha mont a raent betek kemer perzh er strolladoù politikel broadelour, Strollad Broadel Breizh, dreist holl. N'eo ket souezhus neuze klevet tonioù el Gwir Vretoned pe Bro Gozh Ma Zadoù sonet e deroù gKAV.

⁸ « Enquête “Sonneurs” : Marcel AUDIC », Musique Bretonne, n°83, 1988

⁹ « Enquête “Sonneurs” : Marcel AUDIC », Musique Bretonne, n°83, 1988

Sonerezh dieub ar binioù – bombard a laosk plas buan d’ur sonerezh a strollad èl ma veze graet get ar soudarded er *clique*-où. Ur pemzek soner bennak, dispartiet e tri rummad bombardoù, taboulinoù ha binioù bras, en em vodas e penn kentañ an nevez amzer ag ar blez 1932 evit soniñ asambles. Ganet e oa KAV.

Hiriv an deiz eo diaes deomp gouzout perak ez eus bet implijet ur benveg skosat, ar *bag-pipe*, en ur strollad savet evit aroueziñ ar sonerezh Breton. Doc’h ma konter e oa bet degaset ar benveg-mañ da Vreizh get Taldir JAFFRENOU hag en doa roet unan d’e vab etre an daou brezel, goude bout bet chomet boemet dirak ur *pipe-band* skosat e-pad ur veaj ‘kostez Glasgow. N’eo ket bet pell ar benveg o vout degemeret mat get ar viniouerion vretan e Pariz hag edan berr amzer e oa bep a viniou gete. Hag oc’hpenn kement-se emañ heñvel uhelder ar binioù-bras get hani ar vombard, p’emañ ar binioù kozh un eizhvetezh skiltroc’h, aesoc’h evit soniñ a stroll.

Krouet zo bet neuze, ur strollad nevez savet diàr hengoun ar c’houbladoù breton met buan ha buan e krogas da vout diaes kavout ur benveg da bep hani. Hervé LE MENN a goumananas un nebeud bombardoù e ti ur luder parizian.¹⁰ Met ne oa ket kenkoulz son ar bombardoù-se èl ar benvegoù hengounel. Dorig LE VOYER a adlabouras àr ar benvegoù-se, setu penaos e oa en em lañset da vout luder ar BAS. Hervez Polig MONJARRET eo bet diaes dezhañ en em lañsiñ ha produiñ an niver a vombardoù goulennet ha savet en doa e 29^{vet} bombard e 1939 (niverennet a oa ar benvegoù d’ar mare-se). Oc’hpenn ar vombardoù en deus, Dorig LE VOYER, azasaet ar *bag-pipe* skosat evit ma vehe kendonietoc’h get ar vombard, anvet binioù-nevez.

Alies mat e vez gwelet ar gKAV èl orin ar BAS, met ret eo stadiñ mat e oa bet savet ar strollad binioù ha bombardoù-se e Pariz evit ar Barizianed dreist-holl. Neoazh e oa bet un eskemm get sonerion ar gKAV ha sonerion breton e Bleun-brug Plougastell-Daoulas e 1937 evit sevel ur strollad heñvel doc’h ar KAV e Breizh. Met diskleriadur an Eil Brezel bed a gasas ar raktres da netra.

b- Krouidigezh Bodadeg ar Sonerion

Krouet oa bet Bodadeg ar Sonerion e-kreiz an Eil Brezel bed. Daoust d’ar c’hoant bras o doa ar grouerion ne zeuas lañs d’ar gevredigezh nemet pa voe echu ar brezel ha pa voe bet dieubet ar vro.

¹⁰ « Polig MONJARRET parle de Dorig LE VOYER (1914-1987) », Ar soner, 1987-1988, n° 299, n° 300, n°301

Ar vignoniezh hag ar yaouankiz a oa gerioù-stur krouidigezh Bodadeg ar Sonerion. E 1942 e voe kaset ar raktres get Polig MONJARRET, 21 blez, Jef LE PENVENN, 22 vlez hag ar re gozhañ a oa Dorig LE VOYER ha Robert MARIE, 28 vlez.

Polig MONJARRET ha Dorig LE VOYER o deus merket istor ar BAS. Daoust d'eo seizh blez diforc'h e oa tost an daou soner ha ken pouezus evit dioren ar BAS.

Mont a reas Dorig LE VOYER da veviñ e Roazhon goude bout bet disoudardet e 1940. Buan-tre e yeas e darempred get kelc'h keltiek Roazhon, 'lec'h ma kejas get sonerion ha danserion, izili an SBB. Gete e kemeras perzh ar luder er bagadoù-stourm aozet get ar strollad politikel broadelour. Dont a reas da vout un den a bouez e kevredigezh ar c'helc'h hag anavetoc'h anavetañ a oa a-drugarez d'e vombardoù ha d'e bochoù binioù. Oc'hpenn gouzout ur bern tonioù ha diazezoù an dañsoù Breton, e ouie hennezh doc'h ar sonerezh klasel pa oa e teskiñ ar violin e Pariz. Getañ e oa bet aozet beaj ar gKAV e Plougastell e 1937 evit klask sevel strolladoù sonerion e Breizh. Diaes oa dezhañ donet a-benn a aoziñ hag a streviñ e soñj e Breizh. Evit en ober e voe sekouret kalz get donedigezh un den yaouank ha mennet anvet Polig MONJARRET.

Ganet a oa Polig MONJARRET e Pabu e 1920 en ur familh brezhonegerion met skoliataet a oa bet e Galleg e Gwengamp, lec'h ma ne veze komzet eus an hengoun Breton e-pad gouelioù ar Sant-Loup nemet. Deskiñ a reas eñ ivez ar sonerezh klasel get ar violin ha kemer a reas perzh er skouted yaouank. Mont a reas da labourat da Vordelles goude fin e stummadur skout evit labourat e skol stummiñ ar labourioù àr ar sport hag àr ar yaouankiz. Eno e kejas get dañserion a gelc'h keltiek Roazhon. Heuliiñ a reas e vignoned betek ti ar c'helc'h keltiek lec'h ma klevas evit ar wech kentañ son bombard Dorig LE VOYER. Preniñ a reas doc'htu ur vombard get ar luder ha setu eñ kroget da zeskiñ soniñ.

Dont a reas da vout soner e mesk sonerion ar c'helc'h ha deskiñ a reas kodoù an hengoun. Hehervez ur pennad bet kavet e niverenn n°53 *Ar soner* e oa bet pedet Polig MONJARRET get Loeiz ROPARZ da soniñ get e gomper en un overenn e Lokmaria-Berrien e 1942 :

“La participation à cette noce fut pour Polig une véritable révélation. Il s’est rendu compte qu’on pouvait, en musique, faire quelque chose en lien direct avec le peuple, ce qu’il n’avait pu ressentir en étant en ville dans un cercle celtique »¹¹

¹¹ « Polig MONJARRET, un pionnier du renouveau musical », *Ar soner* 1993, n° 353

Ha setu lakaet en e soñj sevel ur gevredigezh evit bodiñ tout ar sonerion tro-dro d'an hengoun met hep gouzout da vat penaos ober na peseurt anv lakat d'ar strollad nevez-se. Hervez ar vojenn e vehe bet kavet an anv goude ur gentel brezhoneg get Maodez GLANNDOUR e kelc'h keltiek Gwengamp :

*“ Le premier cours auquel j’assistais concernait la manière de faire un substantif à partir d’un verbe, et un verbe à partir d’un substantif. Maodez GLANNDOUR prit comme exemple le verbe bodañ, réunir, grouper, assembler, qui donnait le substantif bodadeg, groupement, assemblée, Poursuivant son exemple il dit : Bodadeg ar Sonerion, l’assemblée des sonneurs ”*¹²

Skrivet en dehe Polig MONJARRET da Dorig LE VOYER evit kinnig dezhañ an anv hag an teskanv choazet : Bodadeg ar Sonerion ha BAS.

Polig ha Dorig a voe resevet get Roparz HEMON, prezidant Framm Keltiek Breizh, evit kinnig o raktres. Plijet a voe ar skrivagner get soñj an daou soner ha pedet a voe bet ar BAS da soniñ e kendalc'h ar Framm Keltiek e miz Mae 1943. Setu lañset ar gevredigezh.

Klevet a voe strollad ar BAS e soniñ evit ar wech kentañ d'an 23 a viz Mae 1943 e C'hoariva Ti-kêr Roazhon evit degemer kendalc'h ar Framm Keltiek. Kemeret a voe an deziad-se evit krouidigezh ar BAS. Hervez Polig MONJARRET e voe primaozet an arvest dre faot ar c'henarroud brezel, ha un degad sonerion a oa bet bodet an deiz-se.

“Nous étions huit sur l’avant-scène du theatre de Rennes : trois bombardes : Dorig, Iffig HAMON et René TANGUY; trois binioù-bras : Robert MARIE, Efflam KUVEN et moi-même. On s’était joint deux batteurs, un nommé JOLY et Jean RIVIERE

*On sonna trois airs : une marche dite « Robert BRUCE » qui n’était en fait qu’une version très approximative du Scotts Wha Hae, la marche des Moutons Blancs de Pontivy et la marche de la BAS, composée par Dorig.”*¹³

Pedet a oa bet kazetennourion an deiz àr-lec'h evit eskemm get ar sonerion nevez. Polig MONJARRET en deus dalc'het soñj :

“A part quelque fidèles supporters de la première heure comme Yves TYMEN, Yves TRANVOUEZ, Loeiz ROPARZ, Job JAFFRE, Jef LE PENVEN (qui connut le succès la veille

¹² « Polig MONJARRET parle de Dorig LE VOYER », Ar soner, 1987-1988, n° 299, n° 300, n°301

¹³ « Polig MONJARRET parle de Dorig LE VOYER », Ar soner, 1987-1988, n° 299, n° 300, n°301

au soir avec son poème symphonique *Les Celtes*), Youenn DREZEN, Mme de BELLAING, la conférence n'attira guère que quelques curieux. »¹⁴

Goude an arvest e oa bet kinniget kentañ Bodad-reniñ Bodadeg ar Sonerion lec'h ma voe dilennet :

- Prezidant : Dorig LE VOYER
- Is-Prezidant : Efflam KUVEN
- Teñzorour : Robert MARIE
- Sekretour : Polig MONJARRET

Implijet e voe an devezh-se evit displeg petra oa palioù an aozadur. E niverenn kentañ *Ar Soner* e vez kavet un nebeud linennoù bet skrivet get Polig MONJARRET 'lec'h ma tispleg soñj pennañ ar BAS, da lâret eo :

*“Le jour où chaque commune de Bretagne possédera son couple de sonneurs, BAS aura atteint son but”*¹⁵

Resisaet eo palioù gwir ar BAS dek vlez goude er gazetenn *Ar Soner* atav. Tennet eo an destenn mañ a ziviz miz Mae 1943 dirak ar Framm Breizhat :

“ Nous voulons qu'elle soit (la BAS) à la fois une confrérie, un mouvement de jeunesse bretonne. Notre premier principe est que nous sommes d'abord et pour toujours des amis sincères, plus peut-être, de véritables frères, les enfants d'une famille unie et soucieux de ses intérêts.

Une confrérie ? Oui comme jadis les corporations ou les nations d'étudiants nous voulons être une assemblée d'hommes dévoués corps et âmes à une même cause, respectant les mêmes règles, vivant sous une même loi.

Un syndicat ? Oui, et c'est-à-dire que nous entendons défendre les intérêts de nos adhérents. [...] Le métier ne paie plus. Il convient donc de revaloriser, de permettre aux jeunes sonneurs sinon d'en vivre du moins d'en faire un métier annexe comme jadis.

Un conservatoire ? Oui, comme le font les organismes d'état, école de musique ou mission d'enquêtes folkloriques, nous désirons d'abord sauver de l'oubli le répertoire immense que détiennent chanteurs et sonneurs et qui s'amenuise un peu chaque jour [...]

¹⁴ « Polig MONJARRET parle de Dorig LE VOYER », *Ar soner*, 1987-1988, n° 299, n° 300, n°301

¹⁵ Polig MONJARRET, « *Ar soner est né ...* », *An soner*, 1949, n°1

Nous avons le sentiment d'être le trait d'union entre la Bretagne musicale d'hier et la Bretagne musicale de demain [...] Notre premier souci donc, est de nous plier à ses exigences, et en même temps de redonner à la jeunesse de notre pays l'amour des traditions et particulièrement de cette tradition musicale, vocale ou instrumentale, et avec cette amour les principes de folkloristes intègres qui sont les nôtres.

Un Mouvement de Jeunesse Bretonne ? Oui, et c'est là l'aspect le plus important de cette affaire que nous lançons aujourd'hui. Notre but n'est pas seulement de faire de la musique bretonne mais surtout de faire des sonneurs de vrais Bretons. Un sonneur, tel que nous le concevons, doit être un Breton complet, intéressé par tout ce qui est breton et prêt à défendre tout ce qui l'intéresse, autant la langue bretonne que les intérêts économiques ou culturels, voire même simplement pécuniaires de nos compatriotes [...] Comme tout Mouvement de Jeunesse nous exigerons de nos membres une tenue irréprochable et à tout instant. Un sonneur doit-être un Breton total sur lequel le pays doit pouvoir compter »¹⁶

Laket a veze splann en a-raok ar soñjoù brogarour pe broadelour kaset da benn get ar BAS. Sklaer oa, e oa ret da bep soner bout Breton penn, kil ha toad, difenn e bro, e yezh hag e sevenadur. Oc'hpenn bout ur gevredigezh diazezet àr ar sonerezh e teuas ar BAS da vout ur gwir skol. Gwelet a veze mat framm ar skouterezh a-barzh komzoù Polig MONJARRET. D'ar mare-se e oa sklaer evitañ ne c'helle ket ar sonerion chom hep stourmiñ evit ar vro. Hag èl e pep stourm e oa ret klask kendrec'hiñ ar muiañ posubl a dud evit klask saveteiñ an hengoun.

En em zistag a ra BAS a-zoc'h ar metoù folklorel hervez Polig MONJARRET :

« Pour un folkloriste s'intéresser à toutes matières populaires est une fin ; pour nous, ces matières sont un moyen. Nous nous y intéressons par patriotisme. »¹⁷

Estroc'h evit ar paliou-se o deus ur c'hoant d'o c'has àr-raok, termenet edan tri foent displeget e Reoladurioù ha Reolennadur embannet get ar BAS.

« 1- Par une corporation des sonneurs bien organisée et puissante, au sein de laquelle ils seront protégés les intérêts des sonneurs.

2- Par la formation des élèves sonneurs

¹⁶ Polig MONJARRET, « Lettre à un ancien », *Ar soner*, 1959, n°113

¹⁷ Polig MONJARRET, « Sommes-nous des folkloristes ? » *Ar soner*, 1949, n°2

3- *Par des actions de propagande : participation à des fêtes, auditions, émissions... »*¹⁸

Kavet a vez er memes diell un destennig lec'h ma vez displeget emañ difennet d'ar BAS nac'hiñ ur sonadeg dre zigarezioù ideologel ken ma ne vez ket taget ar vro pe an hengoun get an aozerion. Evit kas o ideologiezh à-raok, da lâret eo kas Breizh d'an uhel mod pe vod, e oant prest da vont àr n'eus fozh peseurt hent, souten ar « Comité consultatif de Bretagne », tost d'an nazied ha da renad Vichy a c'hell bout ur skouer pe c'hoazh embann soñjoù gouenelour e reoliadur ar BAS : « *La BAS n'accepte comme membre actif que les bretonnants de race* »¹⁹.

Fin ar brezel hag ac'huberezh ar vro get an Alamanted a voe ur prantad diaes evit ar BAS hag e renerion. En em laket oa an STO da glask àr-lec'h pennoù an aozadur ha startoc'h-startañ e oa evit an izili en em dolpiñ evit pleustriñ. Tizhet a oa tout ar boblañs get an okupasion, tailhoù àr ar boued ha danvezioù pembez. Dont a reas diaes da zDorig LE VOYER kaout peadra da sevel binvioù nevez.

Daoust da-se e veze klasket get an izili aozin ar gevredigezh. Ar pal kentañ a oa savetein tonioù ha kanennoù kozh. Krogiñ a reas Polig MONJARRET da glask sonerion ha kanerion e pep lec'h e Breizh adal 1942, ha da zastum tonioù ha kanennoù gete. Ne oa ket tu dezhañ enrollin an tonioù dastumet getañ ha ret a oa dezhañ skriviñ anezhe tout àr karnedennoù bihan, e doare folkoristed an XIX^{vet} kantvet. An tonioù-se eo a vez kavet hiriv er levrioù *Tonioù Breizh-Izel* 1 ha 2 bet embannet e 1984 hag e 2003.

A-raok embann an tonioù dastumet get Polig MOJARRET da izili ar BAS e oa ret dezhe bout studiet get sensor ar gevredigezh, Jef LE PENVEN, evit ma vehe estimet getañ pegen hengounel e seblante pep ton dezhañ.

Jef LE PENVEN a oa bet stummet kement àr ar sonerezh klasel èl ar sonerezh Breizhaat. Anavet e oa dreist-holl evit bout bet rener laz-sonin broadel bro-C'hall da 21 blez nemetken pa oa bet dilojet ar strollad da Roazhon e 1941. Dont a reas buan da vout, àr goulenn Polig MONJARRET ha Dorig LE VOYER, sensor ar BAS. Ret a voe dezhañ studial an tonioù bet dastumet get Polig MONJARRET ha rein dezhe un hengouneladur breizhat hervez ar skeuliad hag an ton. Pal ar sansadur-se a oa glanaat ar sonerezh vreizhaat ha skarzhiñ an tonioù barnet di-hengoun. Hiriv an deiz ez eus tu da deurel ur sell kritik àr gement

¹⁸ Bodadeg ar Sonerion, « Reoladurioù ha reolennadur, règlement intérieur »

¹⁹ Bodadeg ar Sonerion, « Reoladurioù ha reolennadur, règlement intérieur »

oberiantiz. Pep hengoun a zo bet awenet get sonioù hag hengounioù all a-hed ar blezadoù. Kavet a vez tonioù « hengounel » tennet a donioù bet klevet er brezelioù pe memes e lez roueed Bro-C'hall. Kollet e oa sur a-walc'h ur bern tonioù diàr barnadur un den. Tu zo da da liammañ ar labourioù-se get ar re bet kaset get ar yezhoniourion breton en XIX^{vet}, Yann-Fañch AR GONIDEG en o-zouesk.

Daoust d'ar brezel e yae àr-gresk niver an izili, hag enrollet a oa bet ar 105^{vet} emzeladur e miz Even 1944. Met dieubidigezh ar vro a gasas d'un nebeud diaesterioù d'ar gevredigezh.

c- Diorroadur ar BAS goude an eil-brezel bed

Diaozet e voe Breizh, Bro-C'hall hag Europa a-bezh goude an dilestradeg hag an dieubidigezh ha start e voe d'ar BAS chom bev get kement a gemmoù. Harzet e voe Dorig LE VOYER ha Polig MONJARRET get ar Gestapo e miz Gouere 1944 ha kaset betek an Tyrol Aostrian. Dieubet e voent bet e miz Mae 1945 hag adkaset en toull-barzh e Breizh lec'h ma voa tamallet dehe bout izili a vBreiz Atao. Goude un nebeud mizioù er prizon e voent dizalc'het e miz Du 1945.

Disfiz a voe lakaet àr an Emsav breizhat goude an Eil Brezel bed, ha kement all àr ar sonerion hengounel :

« Disons que dans l'esprit dérangé de certains, sonner du binioù s'était assimilé à de la collaboration avec l'ennemi. Un grand nombre de sonneurs payèrent assez cher cette preuve de germanophilie : certains furent condamnés à la prison, d'autres s'en tirèrent avec quelques mois de « Camps d'internement Administratif ». D'autres, qui furent acquittés après des mois de préventive, en furent marqués à vie. »²⁰

Komprenet vez gwelloc'h perak ez eus un troc'hig e istor ar BAS goude an Eil Brezel bed. Adlañset e voe memestra ar gevredigezh get Polig MONJARRET e fin ar blez 1945. Galvet e voe ar 105 ezel bet enskrivet a-raok an dilestradeg, met ur pemzek bennak, nemetken, a respontas.

E miz Genver 1946 e voe bet ofisializet ar gevredigezh goude bout bet enrollet ar statudoù e prefeti Roazhon. Embannet e voe diskleriadur ar gevredigezh er gazetenn ofisiel e miz Meurzh 1946. Evit klask adsevel skeudenn ur gevredigezh en arvar, bet lakaet diskred

²⁰ « Polig MONJARRET parle de Dorig LE VOYER », Ar soner, 1987-1988, n° 299, n° 300, n°301

àrnezhañ abalamour d'ar c'henemglev get an Alamanted, e oa bet soutenet get pennoù bras ar vuhez foran èl ministr an diabarzh pe maer Roazhon. Adlañset e oa Bodadeg ar Sonerion.

Tamm ha tamm e adkreskas an niver a izili. E-leizh a dud yaouank en em enskrive er c'helc'hioù keltiek hag er BAS. Daoust da-se e voe diaes d'an aozadur respont da gement a c'houlennoù. Lakaet e voe diaes ludour ar BAS, Dorig LE VOYER, get an divoer a zanveziou betek deroù ar blezadon 1950. Dont a rae memestra ar binvioù da vout standardizetoc'h ha kendonietoc'h.

Hervez *Ar Soner* e kresk c'hoazh an niver a izili, 675 ezel e C'hwevrer 1946²¹ ha tro 1000 ezel er blezadon 1950-1951²²

Dont a rae ar c'hehentiñ da vout a-bouez bras evit krouiñ ur genrouedad etre ar sonerion. Adal krouidigezh ar BAS oa bet lakaet e plas lizher miziek anvet *La Lettre Mensuelle*, lec'h ma veze displeget diorroadur ar gevredigezh da bep ezel. Hervez Steven OLLIVER²³ n'eus bet nemet c'hwec'h *Lettre Mensuel* e-pad ar brezel. Ar lizher-se a veze tennet ar follennoù-nij, ne oa ket c'hoazh ur gwir gelaouenn. Tennet oa bet un daou-ugent niverenn bennak etre 1942 ha 1954. Met evit gellout tizhout ar muiañ posubl a dud e oa bet krouet ur gwir gelaouenn divyezheg *Ar Soner* e miz Mae 1949. Dont a ra buan tre, da vout ur gelaouennbpouezus e-mesk ar yaouankiz breton dre ma veze embanet get ar BAS ha get Kendalc'h, kevredigezh ar c'helc'hioù keltiek savet e 1950.

Stankoc'h oa an danvez kavet er gazetenn *Ar Soner* evit ar pezh a veze kavet er *Lettre Menseuel*, ha dont a rae da vout ur liamm nemetañ etre ar sonerion. Kavet a veze pennadoù skrid ar danveziou disheñvel evit brudiñ Breizh, ar Vretoned hag an hengoun. Kavet a veze displegadurioù ha studiadennoù dañsoù, tonioù, dilhad ha pennadoù broadelour. Plas ar brezhoneg a zo a-bouez e niverennoù kentañ *Ar Soner*, kavet a veze pennadoù e brezhoneg, kentelioù brezhoneg, pajenn gentañ ar gelaouenn a oa divyezheg memes, met dilaosket a voe tamm ha tamm ar yezh-mañ er gelaouenn. Ne vez ket mui kavet ger brezhoneg ebet hiriv an deiz er gelaouenn.

Evit rennerion ar BAS e oa ret kas un tamm deskadurezh breton d'ar sonerion yaouank. Dre-se e oa bet savet a oa bet kampoù hañv ha gouiañv get Polig MONJARRET evit gallet deskiñ da yaouankiz Breizh o hengoun hag o sonerezh. Savet e oa ar c'hampoù diàr

²¹ *Ar Soner*, 1949, n°5-6

²² *Ar Soner*, 1949, n°17

²³ OLLIVIER Steven, « Bodadeg ar Sonerion, L'assemblée des sonneurs, du musicien breton », Mémoire de maîtrise, Centre de recherche d'histoire culturelle et religieuse, Université de Rennes 2, 1994, p. 80

soñj ar skouterezh lec'h ma veze lakaet an deskadurezh e-kreiz ar jeu. Ar c'hampou-se oa bet krouet ivez evit lakaat ar sonerion yaouank da zaremprediñ get ar sonerion varrekañ ; hag evel-se derc'hel get an hengoun a zo bet a viskoazh ha treuzkas ar gouiziegezhioù a rumm da rumm. Roet e veze ivez kentelioù brezhoneg rediet er c'hampou evit ma vehe gouest ar sonerion yaouank d'ober get ar brezhoneg pe da nebeutañ kompren anvioù an tonioù, daoust ma veze aozet buhez ar c'hampou e galleg hervez Georges CADOUDAL.

D'ar mare-se e veze kavet pevar live e-mesk ar sonerion : “an arnoderion”, “an trec'h-seizenn”, “an hanter-drec'h” hag “an deraouidi”. Tu a veze da cheñch rummad en ur dremen arnodennoù e-pad ar stajoù-se. Kavet a vez roud ag an arnodennoù graet evit ar sonerion a-dal 1943. Savet oant bet evit reiñ ur live resis da bep soner e aozadur ar gevredigezh ha àr anaoudegezh an hegoun. Pal ar stajoù-se a oa reiñ lañs ha brudiñ an aozadur hag aozet a oent kentoc'h àr un aozadur skout evit un aozadur skol. E pep live e veze kavet un arnodenn àr ar gouizidigezhioù hag unan pleustrek. En holl e veze kavet div arnodenn displeget spisoc'h edan :

An Hanter-drec'h eo an arnodenn gentañ tremenet get an deraouidi. Ne c'hellomp ket komz ag un diplom evit mat met kentoc'h eus ur statud tapet get sonerion yaouank da c'hortoz tremen da dTrec'h-seizenn, arnodenn uhelañ an aozadur. Ar sonerion Hanter-drec'h a oa sañset bout gouest da soniñ ha da lakaat da zañsal tud ar c'helc'hioù keltiek. Ret a voe dezhe gouzout soniñ ivez un nebeud tonioù a-boz pe da vale, eizh da nebeutañ, *Bro gozh ma zadoù* en o zouesk, ha bout gouest da gendoniñ o benveg. Ret e oa d'an deskarded-sonerion tremen an Hanter-drec'h dirak an Arnodennourion, kuzul meur an aozadur, Polig MONJARRET, Dorig LE VOYER, Robert MARIE, Albert HEMERY ha Marcel LABBE en o-zouesk, pe dirak ar Sonerion Seizenn, da lâret eo ar sonerion tizhet gete an Trec'h Seizenn.

Diaesoc'h oa ar pezh a veze goulennet evit tizhout renk ar sonerion Seizenn. Ret a oa da bep soner mestroniñ ur roll-tonioù hiroc'h, get tonioù daet a bep bro a Vreizh. Ret a oa ivez dezhe mestroniñ ar sonerezh hag ar solfeadurezh dreist-holl. Ret a oa dezhe memes gouzout ober o lanchennoù. An diplom-se ne c'helle bout roet nemet get ar c'huzul meur, an Arnodennerion.²⁴

Diforc'hiet a veze ar sonerion a-drugarez da liv o seizenn staget àr o zokoù ha get un arouez bihan staget doc'h o jilettennoù. Kavet a veze seizennoù all hervez ar renk hag ar binvioù implijet, èl ma c'heller lenn en niverenn ““Petra eo BAS”” :

²⁴ « Petra eo BAS ? », *Ar soner*, 1952, liammet get an niverenn 30, p.31

*“Le ruban vert correspond à l’Hanter drec’h, le ruban rouge au Trec’h Seizenn. Les élèves sonneurs portent le ruban blanc. Les Arnodennerion portent les trois couleurs en même temps. Ce système s’élargit aux sections « vielle » et « eostig Breizh » (chant) qui abordent respectivement le bleu et le violet. Plus tard les batteurs ont droit au port du ruban jaune, la grosse caisse portant quant à elle, le ruban orange ».*²⁵

Emabannet a veze disoc’hoù an arnodennoù a-barzh *Ar Soner* pezh a roe lorc’h d’ar sonerion nevez enoret. Hervez an disoc’hoù-se ne veze ket diaes kendrec’hiñ ar sonerion yaouank da dremen pep arnodenn evit reiñ ar chañs dezhe da enoriñ ar seizennoù nevez hag ar reolenn bennañ a oa bet savet evit ar sonerion Seizenn :

*“Chaque Soner Seizenn s’engage à former chaque année un sonneur au moins. Le Sonneur Seizenn refusant sans prétexte valable de se plier à cette clause sera exclu de la société ».*²⁶

Gwelet e vez mat oa bet savet ar c’hampoù-se evit deskiñ ar muiañ a sonerion evit ma c’hellehent d’o zro streviñ ar sonerezh hengounel e pep lec’h er vro. Evit renerion an aozadur e oa a-bouez kaout annezadurioù lec’hel evit bout gouest da vrudiñ ar sonerezh hag aozadur ar BAS. Savet a oa bet ar c’hevrennoù evit ober kement-se.

Ne vehe ket bet tu evit ar gevredigezh kenderc’hel hep un aozadur resis. Ijinet a oa bet ar c’hevrennoù, evit bout izili ag ar BAS, a-benn ober ar liamm etre ar sonerion hag ar c’huzul meur, dizalc’h ag ar BAS e-keñver renerezh hag argant, evit adsevel spered ar c’hloerdioù, ar c’hêrioù hag an eskoptioù, da lâret eo lorc’h ar c’hornioù bro get ar c’hoant degas un hengoun nevez d’ar vro en-dro :

*« En réorganisant le “pays” nous aiderons à sa renaissance. Les sonneurs d’un “pays” feront revivre la danse d’un “pays”, la danse fera renaître le costume. Costume, danse et musique feront revivre la langue »*²⁷

Gwelet a vez spis en destenn-mañ, bet skrivet get Polig MONJARRET er *Revue mensuelle* n°20 bet embannet e miz C’hwevrer 1947, penaos e oa pal diwezhañ ar BAS adplantiñ e kreiz ar jeu. Implij ar sonerezh evit brudiñ ha streviñ ar brezhoneg, soñj ur dispac’h yezhel kaset get ar sonerezh ha folklor dilhad ar c’helc’hioù keltiek. Kaset a oa bet ur galv get penn ar gevredigezh d’an holl sonerion evit displeg ar soñj-mañ dezhe:

²⁵ « Petra eo BAS ? », *Ar soner*, 1952, liammet get an niverenn 30, p.31

²⁶ Bodadeg ar Sonerion, « Reoladurioù ha reolennadur, règlement intérieur »

²⁷ OLLIVIER Steven, « Bodadeg ar Sonerion, L’assamblé des sonneurs, du musicien breton », Mémoire de maîtrise, Centre de recherche d’histoire culturelle et religieuse, Université de Rennes 2, 1994, p. 90

« La kevrenn doit être puissante pour obtenir ce résultat. Sonneurs isolés, regroupez-vous, réunissez-vous souvent, apprenez les airs de votre pays, avant les airs écossais, irlandais, avant même d'apprendre les airs des pays voisins. Imposez-vous ! Dans chaque fête, dans chaque noce, il faut que l'on danse breton. Si la kevrenn parvient à s'organiser comme le Comité Directeur de BAS, dans 10 ans la Bretagne aura retrouvé son caractère véritable. »²⁸

A-dreñv ar gerioù broadelour-se, e c'heller santiñ c'hoant Polig MONJARRET da lediñ sonerion e pep lec'h e Breizh. Ne gomze ket c'hoazh ag ar bagadoù, met komz a ra eus ar sonerion nemetken, padal e veze dija klevet strolladoù sonerezh kaset get binvioù nevez e pep lec'h e Breizh, a c'houde ar blezadoù tregont èl ma vez displeget mat get testennioù resis er levr *Musique Bretonne*²⁹ pe romantelezet muioc'h er levr *La musique en Bandouillère*³⁰. Evit Polig MONJARRET ne oa ket ar seurt sonerezh nevez-se gwir sonerezh Breizh. Ret evitañ adhengounelaat ar vro get ar bombard hag ar binioù, bras pe bihan ha skarzhiñ kuit ar binvioù all, daoust ma oa bet degaset ar binioù-bras hag an taboulinoù a vro-Skos...

Adal 1943 e oa bet soñjet get krouerion ar gKAV ranniñ an aozadur dre gevrennoù met ret a voe gortoz fin ar brezel ha krouidigezh ar BAS evit gwelet kement-se o tegouezhout. Ar c'hevrennoù a oa aozet e-keñver ar c'hornioù-bro. Kavet a veze kevrennoù staliet e kêrioù bro-C'hall e lec'hioù ma oa bet kreñv an divroñ èl e Angers hag e Pariz pe c'hoazh e broioù estren e-giz hani Dakar, Tunisia pe c'hoazh hani bro Maroko. E miz Meurzh 1947 e oa bet embannet sklaer aozadur ar c'hevrennoù ha niver o izili, embannet eo bet ar sifrou e labour Steven OLLIVIER :

« - Pentevr.....	10
- Leon.....	16
- Bro gwened.....	21
- Bro pourlet.....	4
- Kerne izel.....	34
- Kerne uhel.....	57
- Treger.....	19
- Bro An Naoned.....	26
- Bro Sant-Malo / Dol.....	13

²⁸OLLIVIER Steven, « Bodadeg ar Sonerion, L'assamblé des sonneurs, du musicien breton », Mémoire de maîtrise, Centre de recherche d'histoire culturelle et religieuse, Université de Rennes 2, 1994, p. 90

²⁹

³⁰

- Bro Roazhon.....	35
- Pariz.....	32
- Angers.....	13
- Sonerion strevet e bro-C'hall.....	24 ³¹

Etre tout e oa 304 soner met dislâret oa bet kement-mañ get Polig MONJARRET pa lare ne oant ket c'hoazh holl izili ar BAS. Met daoust da-se e vez gwelet splann ne oa ket marv ar sonerion bombard ha biniou e Breizh.

A-bouez eo adlâret ne oa ket nag aozet na termenet c'hoazh da vat petra oa ur bagad. Ar sonerion-se en em vode evit soniñ ha brudiñ ar biniou-bombard. Ar c'hevrennoù aozet ar gwellañ a veze kavet er c'herioù pennañ el Roazhon, Naoned, Paris, Angers, daoust ma kroge tamm pe damm d'en em lediñ ar maezioù. Un tabut bras a oa bet a-c'houde pell evit gouzout get piv ha pelec'h e vehe bet savet ar strollad sonerezh tostañ da pezh a vez graet "Bagad" anezhañ :

An tresad kentañ a gas ac'hanomp da soñjal oa bet savet ar "Bagad" kentañ e Dinan. Emile ALAIN en doa bodet, goude bout bet klevet ur soner biniou-bras ar aodoù Sant-Nazer, un nebeud sonerion edan urzhioù ar 71^{vet} bataillon soudarded ar-droad Dinan. Kompozet a oa ar bagad get pemp bombard, pemp biniou-bras, pemp taboulin skosad hag un taboulin boud. Hervez un nebeud testenioù e vehe bet turniet kentañ rummad bombardoù Dorig LE VOYER evit ar strollad-se³²

Hervez testennoù all e vehe bet krouet ar "Bagad" kentañ e Brest pa oa bet bodet un nebeud sonerion (ne vez ket james resisaet an niver) ha danserion get Yann CAMUS tavarnour er c'harter Brest Sant Mark e 1946 ivez. D'afere-se e vehe bet krouet kevrenn Brest, daet da vout kevrenn Brest-Bro Leon ha goude, kevrenn Brest Sant Mark, ur bagad bev atav.³³

An trede istor a ro titl enorus ar "Bagad" kentañ da gevrenn Paotred an hent houarn e Karaez, bet savet get Polig MONJARRET e 1948 e bro Léon BRAS, soner bombard ampart hag anavet get an holl sonerion.³⁴

³¹ OLLIVIER Steven, « Bodadeg ar Sonerion, L'assemblée des sonneurs, du musicien breton », Mémoire de maîtrise, Centre de recherche d'histoire culturelle et religieuse, Université de Rennes 2, 1994, p.91

³² MORGANT Armel, ROIGNANT Jean-Michel, « Bagad, vers une nouvelle tradition » ed. Coop Breizh, 2005, p.25

³³ MORGANT Armel, ROIGNANT Jean-Michel, « Bagad, vers une nouvelle tradition » ed. Coop Breizh, 2005, p.26

³⁴ MORGANT Armel, ROIGNANT Jean-Michel, « Bagad, vers une nouvelle tradition » ed. Coop Breizh, 2005, p.26

Hervez Georges CADOUAL, hon eus bet tro da eskemm getañ ur pennadig e vehe bet savet ar strollad kentañ aozet èl ar bagadoù hiriv an deiz get Kevrenn Rostrenn e 1947.

Dibosubl eo eta embann sklaer emen emañ bet savet ar strollad kentañ met kas a ra an tabut-se d'ur gwir gudenn semantel. D'ar mare-se ne veze ket implijet ger ofisiel ebet evit anvñ ar strolladoù-se, ar ger implijetañ o vezañ ar ger galleg “clique”³⁵ tennet a geriaoueg ar soudarded. Ret eo gortoz niverenn pevarzek *Ar soner* evit ma vehe embannet sklaer un anv get prezidant ar mare mañ Dorig LE VOYER :

“Pour nommer un ensemble “binioù-bombarde-tambours”, il ne faut pas dire “clique” mais BAGAD-SONERION. Pour simplifier, je dirais tout simplement BAGAD. (Les cliques sont des ensembles de cuivre et tambours.) Un bagad-sonerion est un ensemble très intéressant, et qui est encore peu connu. Il est nécessaire de préciser, et il en est grand temps la composition et le rôle de chaque participant d'un bagad-sonerion.

Le bagad-sonerion est composé de joueurs de binioù (biniawerion), de bombarde (bombarderion), de tambours, ou mieux de caisse-claire (taboulinerion), et d'un tambour-major “penn-bagad-sonerion ” ”³⁶

Savet eo ar ger diàr “bag” get ar lost-ger “-ad”.

Oc'hpenn bout bet divizet hag embannet anv nevez hag ofisiel ar strolladoù bet anvet “clique” e tiskriv Dorig LE VOYER spis-tre petra eo roll pep soner hervez e venveg er strollad ha penaos aozñ ur bagad e-pad un dibunadeg.³⁷ Setu ganet ar bagadoù, izili a vBodadeg ar Sonerion en ur mod ofisiel.

Adal ar blezadoù 1950 en deus kendalc'het ar BAS d'en em ziorroñ. Lañset a voe bet ar strolladoù-se evit difenn hengoun Breizh, ar sonerezh hag ar yezh dreist holl. Met penaos eo tremenet an diorroadur-se e koulz eil hanterenn an XX^{vet} kantvet ?

³⁵ « Ensemble des clairons et tambours d'une musique militaire. » Hervez ar geriadur Larousse 2007

³⁶ Ar Soner, 1950, n°14

³⁷ Ar soner , 1950, n°14

3- A vBAS da Sonerion

a- Diorroadur ar BAS goude ar blezadoù 1950

Dont a reas buhez ar bagadoù nevez savet get BAS da vout lusket buan get ar c'honkourioù, aozet a voe ar bagadoù en ur rummad nemetken e 1949 ha 1950 hag adal 1951 e voe krouet an eil hag an trede rummad. Dont a reas ivez ar badagoù da vout gwir strolladoù dibunadeg ha krogiñ a rajont da geveziñ ar gwir glikoù orfeonek. Adal ar blezadoù hanter kant e teuas ar bagadoù da vout prizietoc'h prizietañ get ar re yaouank hag ar sistem deskadurezh. Savet a voe bagadoù er skolioù evit stummiñ ar re yaouank d'ar sonerezh ha krouet a voe bagadoù e pep lec'h e Breizh.

“Depuis octobre, nous assistons à une véritable ruée vers la BAS. Une douzaine de bagadoù nouveaux se lancent ! Et les demandes de renseignement pleuvent de toutes parts au secretariat [...] Dans cinq ans, si ce rythme se poursuit, nous aurons cent bagads en Bretagne !”³⁸

Ijinet a oa bet get Dorig LE VOYER ur biniou-bras bihanoc'h savet evit ar vugale. Oc'hpenn er skolioù hag er c'hevredigezhoù foran e oa dedennet buan ar Arme evit digoriñ ur bagad e pep rejumant a Vreizh, awenet get “bagad” an 71^{vet} infantelezh Dinan.

“Le biniou et la bombarde n'ont jamais connu une telle vogue. Après leurs admissions dans les établissements scolaires, voici que le ministère de la Guerre envisage d'en doter les régiments stationnés en Bretagne”³⁹

Kreskiñ a reas buan niver hollek ar bagadoù er blezadoù hanter kant, ken ma oa bet raktreset get Polig MONJARRET tizhout ar c'hant bennak e 1960, met ret a voe gortoz ar blezadoù 2010 evit tizhout kement a strolladoù. Stankoc'h stank e veze ar bagadoù er vro ha uhelaat a rae live sonerezh ar strolladoù, daoust ma chome, àr a seblant, ha hervez un testeni get Alain COCHEVELOU bet juri e konkourioù eil ha trede rummad e 1969 ha meneget e labour Steven OLLIVIER , live an div rummad diwezhañ :

³⁸ Ar soner, 1953, n°40

³⁹ Ar soner, 1953, n°40

“La division des bagadoù en trois catégories au concours national correspond à une réalité musicale, même si les frontières entre les catégories restent comme toutes frontières, plus ou moins arbitraires.

La troisième catégorie est celle des débutants, des apprentis-musiciens ; ce sont donc des groupes inaudibles au public, des groupes d'étude et par conséquent désagréables aux oreilles ; ce sont des groupes de pré-musique. Que ces groupes soient contraints matériellement de s'exhiber, c'est un très grand malheur pour la Bretagne.

La deuxième catégorie est celle qui peut se présenter en public sans faire trop de contre-publicité à la musique bretonne. Ce n'est plus désagréable à l'oreille (justesse) mais la “musique” n'a pas encore atteint ses raisons d'être ni un véritable pouvoir de séduction. Ce n'est plus de la pré-musique, ce n'est pas encore de la musique.

En première catégorie, en 1968, la musique naît ; elle n'est qu'à l'état embryonnaire, mais elle atteint, au concours, la porte d'entrée au niveau professionnel, au niveau compétitif, avec ce qu'on peut entendre, par ailleurs en radio ou en disque. Il n'y a plus seulement des sons (désagréables en 3^{ème}, indifférents ou agréables en 2^{de}), mais une expression, un contact émotionnel musicien - auditeur, en un mot, un art”⁴⁰

Alies-mat hag evit padelezh ar strollad e veze heuliet krouidigezh ur bagad get krouidigezh skologoù sonerezh ebarzhet er gevredigezh. Kemeromp skouer Bagad Melinerion Gwened bet savet e 1954 get vikel an iliz-veur hag a zo chomet e-pad un nebeud blezadoù e trede rummad a-raok tremen buan d'an eil rummad ha tizhout ar c'hentañ rummad e 1968. Chomet int a-c'houde e rummad uhelañ ar bagadoù.

Troc'het e voe lañs ar BAS get fedoù sokial 1968, kemmet oa bet ar gevredigezh ur wech c'hoazh. Dont a reas ivez live ar bagadoù da vout gwelloc'h gwell, pezh a hira prantad stummadiñ ar re yaouank. Diaesoc'h diaes oa evit ar bagadoù kaout izili nevez. Mont a rae ken fall an traou ken e tremenas niver hollek ar bagadoù o kemer perzh er c'henskrivadurioù, a 38 bagad e 1963 da 14 e 1972.

Adlañset e voe ar bagadoù hag ar BAS adal 1972 get donedigezh ar maread folk e Breizh ha driest-holl get arvest mil anavet Alan STIVELL (Alain COCHEVELOU) bet roet e Olympia Paris ar memes blez. Awenet a voe ur bochad sonerion get ar c'haner, soner telenn,

⁴⁰ OLLIVIER Steven, « Bodadeg ar Sonerion, L'assamblé des sonneurs, du musicien breton », Centre de recherche d'histoire culturelle et religieuse, Université de Rennes 2, 1994, p.113

met ivez soner biniou-bras ha penn soner Bagad Bleizmor etre 1961 ha 1970. Adlañset oa kromenn an niver a berzhidi er c'honkourioù !⁴¹.

Adal 1978 e tas ar BAS da vout ur gwir skol stummiñ, goude bout bet resevet karta sevenadurel get Valéry GISCARD d'ESTAING e 1977. Ne veze ket mui implijet sistem ar seizennoù e BAS adal ar mare-se ur gwir skol sonerezh ofisiel. Keldalc'h a reas ar gevredigezh he diorroadur a-hed an amzer. Kavet a veze tamm ha tamm muioc'h mui a sonerion, muioc'h mui a vagadoù e pep lec'h e Breizh, kement e Breizh Izel evit e Breizh Uhel. Krouet a voe memes ar pevarvet rummad e 1998 hag ar pempvet e 2000. Heuliet a voe buan krouidigezh ar rummadoù nevez se get krouidigezh bagadoù skol ebarzhiet er bagadoù anvet bagadigoù pe c'hoazh bagadiganed.

Goude 70 vlez eo daet Bodadeg ar Sonerion da vout ur lusker pouezus e bed ar sonerezh hengounel e Breizh. A-drugarez d'ar gevredigezh-se emañ bet savetaet ha ambrouget ar sonerezh breton. Daet ar BAS da vout brasañ skol sonerezh e Breizh hiriv an deiz. Stummet a vez 4 000 soner yaouank e pep lec'h e Breizh d'ober get benvioù ar bagad en ur implij tonioù hengounel pe tennet ag an hengoun. Hervez sifroù ofisiel BAS e vehe hiriv an deiz 12.000 soner rannet etre ar 110 strollad izili ar gevredigezh.

Ar bagadoù ezel ag ar BAS o deus kaset ar sonerezh hengounel nevez kempennet e pep korn ag ar bed. Bagad An Oriant a zo bet e 2017 e soniñ e New-York evit dibunadeg ar Sant-Patrig, pa oa sonerion bagad Plougastell e Emirelezhioù Arab Unanet pe c'hoazh sonerion bagad Felger e bro Beru.

Abae 2013 eo daet Bodadeg ar Sonerion da vout Sonerion. Kemmet eo bet an anv evit reiñ ur sell nevez da aozadur ha da gevredigezh ar badagoù. Ez-wir emañ anvet ar gerioù “bagad” pe “kelc'h keltiek“ get ur bochad tud met liammet eo ar ger-se get ur strollad resis, Bagad Lann-Bihoue pe Bagad Kemper pe c'hoazh Kelc'h Keltiek ar C'hoesti da skouer. C'hoant en deus bet kuzul meur ar BAS da lakat ar wel get un anv berroc'h, merk bodadeg ar bagadoù.

A-drugarez d'ar merk nevez-se e vez aesoc'h dezhe mont e darempred get an divizerion hag an dilenidi. Dre ar merk-se e vez roet da vat ur gwir bouez da skol sonerezh brasañ ha pouezusañ Breizh.

“Aujourd'hui, Bodadeg ar Sonerion mesure le chemin parcouru et souhaite aller plus loin. S'ouvrir au plus grand nombre, renforcer son attachement aux éléments culturels qui

⁴¹ Sellet doc'h ar stagadenn n°2 : Diorroadur an niver a vagadoù e konkourioù ar BAS

l'entourent, partager ses valeurs. Bodadeg ar Sonerion associera désormais la fédération à un nom de marque, SONERION, facilitant ainsi l'appropriation de son image ”⁴²

Chom a ra digemm palioù Sonerion ha chom a ra staget mat doc'h an hengoun daoust ma chom c'hoazh ur bochad traoù evite da gas à-raok. Oc'hpenn bout gwriziennet mat emañ daet ar gevredigezh da vout anavet èl un hanvoud pouezus e maeziad ar vro hiriv an deiz.

Evit lidiñ 70 vlez Sonerion e oa bet enrollet ur filmig e mod radio “trottoir” lec'h ma vez goulnet get un nebeud tud anavet petra eo evite Sonerion. Setu un nebeud arroudennoù :

“C'est tout ce qui fait que la musique bretonne d'ensemble se porte bien” ⁴³

*“C'est toute la richesse et la diversité de la musique bretonne renouvelée en permanence”*⁴⁴

“C'est tout un travail sur le territoire qui est fait, c'est un travail de formation, on en voit le résultat sur les concours, la façon de se comporter sur scène, des qualités reconnues par tous, ce sont des orchestres. Un travail d'accompagnement des jeunes, un travail intergénérationnel et ça n'a pas de prix” ⁴⁵

*“Un très belle histoire pour contribuer à la pérennité de la musique bretonne mais surtout à sa créativité”*⁴⁶.

⁴² Sonerion, « Dossier de présentation », [Sellet an 30/06/2017], à an URL < <http://www.bodadeg-ar-sonerion.org/wp-content/uploads/2014/04/Dossier-de-pr%C3%A9sentation-sonerion.pdf>>, p. 17

⁴³ Pol Molac, Kannad, video 70 vlez Sonerion, [Sellet ar 02/07/2017], à an URL <<https://www.facebook.com/sonerion/videos/1558736370844241/>>

⁴⁴ Norb ert Métaire, Maer An Oriant, video 70 vlez Sonerion, [Sellet ar 02/07/2017], à an URL <<https://www.facebook.com/sonerion/videos/1558736370844241/>>

⁴⁵ Charles Quimbert, Renner Bretagne Culture Diversité, video 70 vlez Sonerion, [Sellet ar 02/07/2017], à an URL <<https://www.facebook.com/sonerion/videos/1558736370844241/>>

⁴⁶ Jean-Yves Le Drian, Ministr an Europe hag an aferioù estren, video 70 vlez Sonerion, [Sellet ar 02/07/2017], à an URL <<https://www.facebook.com/sonerion/videos/1558736370844241/>>

II- Ar studiadenn

Goude bezañ bet displeget ha plantet kenarroud hag istor Bodadeg ar Sonerion e c'hellomp krogiñ get studi ar vetodologiezh bet implijet evit ar studiadenn-se a studi an data.

1- Metodologiezh

Ret eo deomp displegiñ mat penaos ha perak eo bet savet ar studiadenn-se. Da gentañ penn e vo displeget pal ar studiadenn a-raok mont da welet penaos e oa bet dastumet ha tretet an data. Da heul e vo kinniget spisoc'h ar boblañs hollek.

a- Palioù ar studi

Oc'hpenn studial ar sell hollek àr implij ar brezhoneg e bed ar bagadoù hag ar sonerion hon eus bet c'hoant da vont un tamm pelloc'h, ha studial da gentañ penn poblañs hollek ar bagadoù. Graet eo bet ar labour-se nemet ur wech e 2003, get Aurelien LE GALL evit un daeroù ur labour tezenn àr ar sokiologiezh⁴⁷, a-c'houde krouidigezh ar BAS. Pouezus eo gouzout penaos eo savet poblañs hollek hor studiadenn. Da heul hon eus c'hoant da welet petra eo pouez ar brezhoneg e bed ar bagadoù. Evit en ober hon eus c'hoant da dermeniñ tregantad ar vrezhonegerion e-mesk ar sonerion ha piv eo ar sonerion-se. Dre ar studiadenn-mañ hon eus c'hoant ivez da zielfenniñ modoù implij ar brezhoneg get ar vrezhonegerion hag e bed ar bagadoù, e-pad an darvoudoù da skouer. Pal diwezhañ ar studiadenn a zo stadiñ hag analiziñ petra eo sell ar sonerion en un doare hollek àr ar yezh hag àr he c'himplij e metoù ar bagadoù. Evit bout gouest da respont d'ar paliù bet embannet amañ hon eus dastumet un data a-drugarez d'ur c'houlennaoueg bet strevet e mesk ar sonerion.

b- Ar c'houlennaoueg

Savet eo bet ar goulennaoueg en ur heuliiñ framm ar c'houlennaouegoù bet savet get Fañch BROUDIC ha TMO-Régions, en ur genlabouraat get Fañch BROUDIC ha rener ar memor Ronan AR C'HOADIG. Savet eo bet ar c'houlennaoueg get 39 goulenn, aozet èl-mañ:

⁴⁷ N'eo ket bet embannet tezenn A.LE GALL, an nebeut tirouroù implijet evit ar studiadenn da heul a zo bet tennet eus ar gelaouenn Ar soner n°...

- Ur goulenn evit an holl a benn fesonñ ar c’houlennaoueg
 - Ha komz a rit brezhoneg ?
- Seizh goulenn gouestlet d’ar vrezhonegerion
- Daouzek goulenn evit an holl a-benn studial ar liammoù etre ar yezh hag ar bagadoù
- Seizh goulenn evit an holl evit gwelet sell ar sonerion àr ar brezhoneg er vuhez foran hag en deskadurezh.
- Daouzek goulenn àr identitelezh an hiniannoù goulennataet (seks, oad, tiegezh ...)

Evit kaout ur studiadenn resis eo ret kaout respontoù a berzh 1% ag ar boblañs tizhet da nebeutañ. Gwelet hon eus dija ez eus tro 12 000 hinienn e poblañs sonerion ar bagadoù hervez Sonerion. Daoust-se ha get ar c’hoant kaout ur studiadenn ar resisañ ar gwelañ e oa bet raktreset dastum etre 500 ha 600 respont, da lâret eo etre 4,16% ha 5% eus ar boblañs hollek.

A-benn kaout ur studiadenn representativel emañ ret bout savet goulennoù hag aozñ steuñv ar c’houlennaoueg e-keñver an nann-brezhonegerion, iskis a vehe bet kavout 80% ag ar sonerion hag a rahe get ar brezhoneg. Evel just emañ vez akustumetoc’h ar vrezhonegerion da respont da goulennoù diàr o yezh evit an nann-brezhonegerion. Evit kaout respontoù poellek a-walc’h en ur dizhout ar muiañ a dud eo bet savet ha skrivet ar c’houlennaoueg e galleg, ha disanv oa ar respontoù. Evit bout sur da gaout tud a bep seurt evit respont d’ar c’houlennaoueg emañ ret deomp bout brudiñ ha skigniñ anezhañ ar muiañ ar gwellañ.

Skignadur ar c’houlennaoueg a zo bet ur preder àr hir dermen. Dibosupl e oa kenlabourat get embregerezhioù ispisializet àr ar statistikoù hag àr ar sondadegoù, èl m’en doa graet Fañch BROUDIC get an ensavadur TMO. D’ar liesañ e vez aozet get an embregerezhioù-se, sondadegoù dre bellgomz àr ur stantilhon resis, bet choajet en a-raok hervez an oad, ar seks, ar labour, ar live sokial ha c’hoazh, evit embann disoc’hoù representativel. Ret eo gouzout ivez e vez muioc’h a dud e respont d’an enklaskoù ma vez an enklasker diraze pe dre bellgomz. Tu vehe bet da vont da welet pep bagad, pe kas dezhe ar c’houlennaoueg dre ar post evit lakat ar sonerion da respont d’ar c’houlennaoueg stumm paper met koustus a vehe bet ha ne vehemp ket bet sur da gaout respontoù. Divizet hon eus a benn ar fin implij ar genrouedad ha skigniñ ar c’houlennaoueg dre mail en ur sevel ar c’houlennaoueg àr ar poellad « google form ». Implij ur mod skigniñ niverel a zo bet poellek a-walc’h, daoust ma ne vez

ket tizhet ar sonerion dirouedad, dre ma vez embannet an disoc'hoù àr eeun get ar poellad ha gwelet an niver a respontoù. Pouezus eo bet ivez displegiñ palioù ar studi d'ar sonerion evit o broudiñ da respont. Kinniget eo bet ar c'houlennaoueg get un destennig vihan lec'h vez displeget kement mañ :

« Tu sonnes dans un bagad et tu aimes ça !

Tu connais la Bretagne, sa musique, ses festoù-noz, bref sa culture!

Mais est-ce que tu parles breton ?

Même si tu ne le parles pas, est-ce que l'utilisation du breton autour de toi et dans le bagad t'intéresse, ou au contraire, est ce que le breton et tout, ça commence sérieusement à te gonfler. C'est le moment de donner ton avis.

En tout cas, ça serait pas mal d'avoir une idée un peu plus précise sur la question. Une discussion d'après répétition c'est bien, mais une étude tout ce qu'il y a de sérieux, réalisée par un étudiant de master de breton et sonneur en plus, ça serait encore mieux, non ?

Et bien voilà, c'est parti, l'étude est lancée, et tu vas pouvoir donner ton avis, en répondant à ce questionnaire.

Forcément si seulement les bretonnants répondent, eh bien l'étude sera un peu bancale. Alors n'hésite pas à répondre, même et surtout si tu ne parles pas breton. Et si le breton ça te gonfle, voilà au moins une occasion de le dire. »

Evit bout gouest da skigniñ ar c'houlennaoueg d'ar muiañ a sonerion ez eus bet implijet doareoù disheñvel. Da gentañ penn hon eus kenlabouret get Sonerion hag ar renerez Vonig FRAVAL. Goude gwiriekadur ar c'houlennaoueg geti emañ bet kaset ar liamm internet da dout ar bagadoù ezel Sonerion en ur c'houlenn get pep prezidant skigniiñ anezhañ d'ar sonerion dre vail. Skignet eo bet ar liamm evit ar wech kentañ d'ar 1^{añ} a viz kerzu 2016, ur gudenn teknikel a zo c'hoarvezet, dibosubl a oa kas ar c'houlennaoueg ur wech leuniet , renket eo bet ar gudenn buan a-walc'h ha skignet eo bet un eil liamm, efedus ar wech mañ. Ret eo ansav zo bet kollet sur a-walc'h un nebeud respontoù dre faot an drein-se. Brudet eo bet ar c'houlennaoueg ivez a-drugarez d'ar rouedadoù sokial Facebook dreist holl, ha dre rouedadoù personnel. Oc'hpenn kement-se ez eus bet kaoz ag ar c'houlennaoueg-se er radio, get France Bleu-Breizh Izel, hag er skinwel àr France 3 Breizh e-pad skignadur kenskrivadeg kentañ rummad ar bagadoù e Brest bet dalc'het d'an 12 a viz C'hwevrer 2017. Skignet eo bet ivez ar c'houlennaoueg en ur mod paper e-pad staj nedeleg Sonerion aozet bep blez e-pad vakansoù an Azvent e Plañvour e-tal an Orient. En holl zo bet dastumet 492 respont, da lâret

eo 4.1% ag ar boblañs hollek, nebeutoc'h evit ar perzh a oa bet raktreset met chom a ra korvoabl ar standilhon memes-tra.

Goude bout dastumet ha krouet an data emañ ret deomp bout tretiñ ha sklaeraet an diaz roadennoù.

c- Tretadur ar roadennoù

Tout ar respontoù a zo bet embarzhiet en un doare otomatikel en ur fichennaoueg Excel a-drugarez d'ar poellad “Google Form”, tout ar roadennoù a zo bet tretet er fichennaoueg Excel. Al lodenn vrasañ ha hirañ ag ar studiadenn a-seurt get honnezh a zo sklaeraat an diaz pe an data.

Savet a oa an data get 49 varienn disheñvel ha 492 hinienn. Da gentañ penn eo bet ret bout bodet ha tenniñ an doublennoù ha skarzhet ez eus bet 14 respont en holl, pezh a gas ar boblañs hollad da 478 hinienn, da lâret eo 3,98% a hollad poblañs ar sonerion. Pouezus eo bet ober kement dre ma vehe bet faoaset an disoc'hoù. Da heul emañ ret bout aet da studial ar respontoù hag an evezhiadennoù goulo evit tenniñ anezhe unan hag unan.

Evit gellet implij mat fonksionoù ar poellad exel emañ ret deomp bout bodet un nebeud variennoù evit gellet implij anezhe ar gwellañ posubl. Savet ez eus bet ivez variennoù binarel (ya pe get) evit pep doareenn ag ur varienn. Da heul ez eus bet savet variennoù divzoareen evit ar goulennoù lies-choaj ha doareennoù binarel (ya pe get) hervez an doareennn implijet er respont. Goude an tretadur-se hon eus bet un data disheñvel get 75 varienn.

Ur wech bet tretaet an data hon eus gellet krogñ get ur labour statistikeloc'h en ur ober dielfennadur simpl ha bivariet a-drugarez d'an daolennoù kroaziet dinamek àr ar poellad Excel.


Oc'hpenn tretadur an data hon eus savet div gartenn en ur implij ar poellad “artique”.

Bremañ pa 'z eo bet kinniget metodologiezh krouidigezh ha tretadur an data e vo kinniget un tamm hiroc'h an diazoù bet dastumet. Él m'emañ bet lâret dija ez eus bet dastumet 478 respont en holl. Get ar respontoù-mañ hon eus savet ur boblañs a 478 hinienn, anvet a vo ar boblañs-se ar boblañs hollek. Evit al labour-mañ ne vo ket diforc'het ar bagad hag ar bagadigoù pe ar bagadiganiou. Da skouer respont “bagadig Gwened” a zo bet kontet e iz-poblañs “Bagad Gwened”. E mesk ar respontoù-se ez eus bet respontoù a berzh sonerion 54 bagad disheñvel àr an 72 kevredigezh staliet e Breizh. E-mesk hollad ar bagadoù-se ez eus pemp anezhe staliet e Kemper : Bagad Kemper, Bagad ar Meilhou Glas, Bagad Penharz,

Bagad an Erge-Vihan ha Bagad Sant-Patrick, sonerion an tri bagad kentañ o deus respontet d'ar c'houlennaoueg-se nemetken. E Plougastell-Daoulas e vez kavet ivez daou vagad : Bagad Plougastell ha Bagad Adarre, sonerion an daou vagad o deus respontet d'ar c'houlennaoueg.

Kinniget a vo àr ar gartenn da heul tout bagadoù Breizh. Heuliñ a ra ar gartenn an alc'hwez da heul, savet e-keñver an niver a sonerion o deus respontet d'ar c'houlennaoueg. Evit ar gartenn emañ bet bodet sifroù Bagadoù Kemper ha re Plougastell-Daoulas.

Kartenn n°1 :Dasparzh ar bagadoù hag ar respontoù e Breizh



Merzet a vez ez eus un niver bras a vagadoù staliet àr aodoù su Breizh Izel, ar pezh a roay sur a-walc'h un ur bochad hiniennoù lec'hiet er Penn-ar-Bed hag er Morbihan.

N'hon eus ket kavet sifr ebet evit ar labour-mañ, àr diorroadur poblañs sonerion ar bagadoù a-c'houde krouidigezh ar BAS. Ar boblañs hag a vo kinniget deoc'h e-pad ar labour-se a zo tennet eus ar standilhon bet savet get ar c'houlennaoueg nemetken. Ret eo derc'hel kont ivez ag ar fed e vehe bet respontet en un doare disirius ar goulennoueg get hiniennoù zo. Dibosupl a vo deomp neuze kaout ur studiadenn representativel da vat.


2- Ar boblañs studiet

A-raok mont pelloc'h get ar studiadenn statistikel emañ ret deomp kinnig spisoc'h ar standilhon. Studiet a vo da gentañ penn hollad ar sonerion a-benn bout gouest da zielfenniñ profil ur soner-skouer, ha pa vehe brezhoneger pe pas, a-raok mont da studial iz-poblañs ar vrezhonegerion.

a- Hollad ar boblañs

Da gentañ penn e c'hellomp stadiñ emañ kentoc'h ur metoù paotred. El m'emañ bet lâret er poent istorel eo diaes evit ar merc'hed kaout o flas e bed ar bagadoù, daoust d'un nebeud bagadoù savet evit merc'hed nemetken el hani Nominoe-Redon da skouer. Lakaet a vez splann an diforc'h-se, er standihon, a-drugarez d'ar grafik kinniget edan :

Grafik n°1 : Dasparzh ar reizh er bagadoù⁴⁸



N'eo ket ken souezhus gwelet un diforc'h ken pouezus e-keñver ar reizh e bed ar bagadoù. Ár gresk ez a an niver a merc'hed er bagadoù memes tra. Aurelien LE GAL en doa kavet 21% a merc'hed hepken er bagadoù e 2003. N'hon eus ket kaset ur studiadenn e-keñver rummadoù dre m'hor boa c'hoant da studial hollad ar boblañs hep ober àr-dro al live sonerezh. Merket alies penaos e vez nebeutoc'h a merc'hed er rummadoù kentañ pa vez uheloc'h an dregantad anezhe er rummadoù izelañ. An dra-se a oa bet lakaet sklaer get Aurelien LE GAL. Kavet en doa 17% a merc'hed e kentañ rummad pa oa 37,3% en trede.⁴⁹ Diaes eo displegiñ kement-se , met kriz eo gwelet ur bed ken levezonet get ar baotred p'o


⁴⁸ Tout taolennoù ar grafikoù a vo kavet er stagadennoù

⁴⁹ Ar soner n°371 p.21

deus ar merc'hed o flas er bed-se hag er sonerezh en ur mod hollekañ dre ma vez kavet ar memes kudenn e bed ar sonerezh hag àr ar leurrennoù en un doare hollek.

Studiomp bremañ oad eo ar sonerion zo er standilhion a-drugarez d'ar grafiek niverenn 2 :


Grafik n°2 : Dasparzh oad ar sonerion



Gwelet a vez doc'htu penaos emañ poblañs ar bagadoù ur boblañs yaouank a-walc'h, daoust ma vez sonerion er bagadoù a-c'houde 1947. Kavet a vez memestra 71,76% ag ar boblañs studiet a zo edan 40 blez. Kavet a vez an is-poblañs pouezusañ get 54,60% ag ar boblañs hollek e mesk renkad an 20-39 blez. Chomet eo ingal a-walc'h sifroù ha dregantadoù an oadoù a-c'houde 2003. Kavet a vez tost ar memes dregantadoù e labour Aurélien LE GAL, daoust ma oa bet implijet renkadoù disheñvel ha resisoc'h getañ.⁵⁰

Studiet a vo bremañ liammoù an oad e-keñver ar reizh er boblañs hollek :

Grafik n°3 : Dasparzh an oad e-keñver ar seks



⁵⁰ Ar soner n°371 p.21


Gwelet a vez mat emañ damheñvel ar sifrou àr dasparzh an oad e-keñver ar seks. Kavet a vez memestra àr ar standilhon emañ koshoc’h ar baotred, 31% ag ar boblañs a zo pasiñ 40 vlez pa ne vez ket nemet 21% ag hollad ar merc’hed. Merzet a vez ivez ez eus muioc’h a verc’hied yaouank evit a baotred, 20% ag ar merc’hed a zo edan 20 vlez pa ne vez nemet 15% ag ar baotred. Ar sifrou-mañ a c’hell kas d’ur c’hresk eus ar merc’hed e-mesk sonerion ar bagadoù. E 2003 e oa uheloc’h c’hoazh dregantad ar merc’hed edan 20 vlez, tro 37.6% ag an hollad studiet get Aurelien LE GAL.

Tu zo da da glask displegiñ ar sifrou-mañ : Soniñ en ur bagad a c’houlenn ur bochad euriadoù ha dibennioù sizhun tapet evit pleustriñ pe mont da soniñ e festoù aozet e pep lec’h e Breizh, e bro-C’hall pe memes er bed a-bezh ha diaes a c’hell bout evit tud zo aozñ o deiziataerioù sizhuniek e-keñver ar familh, ar labour pe o dudioù all.

Embannet hon eus splann aze evit poent, penaos , ar soner-skouer, zo ur paotr etre 20 ha 39 vlez. Mont a reomp bremañ da spisaat personelezh ar soner-skouer en ur studial identitelezh sokial ar sonerion.

Kroget a vo en ur studial live deskadurezh hag o diplomoù ar sonerion e bed ar bagadoù get ar grafik da heul :

Grafik n°4 : Live diplom ar sonerion




Merzet vez a-drugarez d’ar grafik a-us emañ bed ar sonerion ur bed lec’h m’eo desket ha diplomet an dud. 69% pe 324 hinienn a sonerion ar standilhon a zo diplomet get un diplom micherel pe skol-veur, pa ne vez nemet 7% pe 34 hinienn hep diplom ebet. Ret eo diwall doc’h diellfenadenn ar goulenn-mañ, an degouezhioù “Brevet” ha “Diplom ebet” a zo kamm,

ez-wir emañ bet respontet an degouezh “Diplom ebet” get bugale n’int ket c’hoazh diplomet ha memes get liseidi o deus d’hor soñj respontet re vuan d’ar c’houlennoeg hep lenn tout ar respontoù posubl.

An niver a a dud o deus respontet kaout ar vachelouriezh hepken a gas ac’hanomp da studial labour pe oberiantizoù ar standilhon, en ur soñjal e vo sur a-walc’h uhel an niver a studierion. Studiet a vo neuze dasparzh ar micherioù er standilhon studiet a-drugarez d’ar grafik n°5 :

Grafik n° 5 : Dasparzh ar micherioù ar sonerion




Heuliiñ a ra an dasparzh micherel sifroù ar stummadurioù. Kavet a vez labourioù evel implijidi da gentañ, 102 hinienn ha 21% ag ar boblañs hollek, heuliet get ar studierion, 97 hinienn ha 20,5% ag ar boblañs. Poellek-tre eo ar chifroù-se e-keñver ar re bet embannet a-drugarez d’ar grafik n°4 . Tu zo da ivez da displegiñ ar fed ma vehe ken uhel an niver a studierien hag an niver a dud get un diplom skol-veur get ar fed e vez kendalc’het ar studioù get ur bochad sonerion. Tu zo da da gemer skouer Louri DERRIEN soner bombard e Bagad Boulvriag en deus kendalc’het e studioù goude bout bet tapet ur lisañs sonerezh hag ur lisañs brezhoneg.

Uhel tre eo an niver a vicherioù a c’houlenn kaout un diplom pe micherel pe skol veuriel, èl micherioù ar c’helenn, an embregerezh pe c’hoazh ar sternerion uhel hag ar micherioù frank. Pouezus eo ivez lakaat àr-wel an niver a zeskarded hag a zo uhel kenañ er standilhon. Kavet a vez 152 hinienn pa vez sammet an niver a skolidi, skolajidi, liseidi ha studierion, da lâret eo 32% eus ar poblañs studiet, pa vez bodet niver ar studierion, ar liseidi, ar skolajidi hag ar skolidi. Ne vez ket kavet nemet 7 hinienn pe 1,4% ag ar boblañs a zo

dilabour. Ar feur-se a zo izel kenañ keñveriet get feur an dilabour e Breizh da 8,8% e fin kentañ trimiziad 2016.⁵¹ Merzet a vez c'hoazh emañ bed ar bagadoù ur metoù lec'h ma vez kavet tud aezet a-walc'h er gevredigezh.


Sellomp bremañ penaos emañ aozet buhez familh ar sonerion er ur studial da gentañ-penn penaos e vevont ha ped a vugel o deus. Evit sklaeraat an disoc'h-se hon eus divizet labourat àr ar rummad oad reprezentet ar muiañ, nemet da lâret eo ar renkad etre 20 ha 39 blez :

Grafik n°6 : Aozadur tiegezh sonerion ar rummad oad 20 ha 39 blez



C'hoazh ur wech emañ sklaer tre ar respont, ar soner-skouer er renkad 20-39 a gondou menaj, dimezet pe pas. Tuchant hon eus savet martezeadennoù àr ar fed e chome ar sonerion-skouer bagadoù er renkad oad-se ha kaset hor boa àr-well penaos e oa diaes sevel ur familh en ur chom da soniñ en ur bagad. Deomp neuze da studial niver a vugale e tiegezh ar sonerion-se.

Grafik n°7 : Niver a vugale e tiegezh sonerion ar rummad oad 20 ha 39 blez



⁵¹ Direccte de Bretagne, Les taux de chômage en Bretagne [Sellet d'an 10/07/2017], àr an URL <http://bretagne.direccte.gouv.fr/sites/bretagne.direccte.gouv.fr/IMG/pdf/direccte_taux_de_chomage_t1_2016-2.pdf>

Tu zo da da ansav sklaer bremañ a-drugarez d’ar grafik-mañ emañ gwir hor martezeadennoù. 75% ag ar renkad 20-39 blez a zo divugel, pezh a ra 193 hinienn ag ar boblañs hollek. Kavet a vez memestra ur c’hart ag ar staidilhon a gendalc’h da soniñ en ur bagad. Kavet a vez memes muioc’h a dud get daou vugel evit reoù get unan. Div hinienn o deus 4 c’hrouadur pe muioc’h memes.


Oc’hpenn ar sifrou-se hon eus bet dastumet testennoù sonerion o deus kuitaet o bagad p’o deus bet o bugel gentañ. Setu unan anezhe dastumet get ur soner bet e bagad An Oriant :

“Klasket am eus chom da soniñ er bagad daoust da ganedigezh ma bugel met buan tre emañ ret din ansav e oa ret din paouez evit chom er ger evit reiñ un taol sikour e lec’h tremen ma amzer e pleustriñ”

Setu kavet daou zisverk oc’hpenn d’ar soner-skouer. Beviñ a ra e kouplad met hep bugel.

Gwelet hon eus uheloc’h emen e oa bet lerc’hiet ar bagadoù bet kavet er standilhon a-drugarez d’ar c’hartennoù. Sellomp bremañ spisoc’h doc’h dasparzh sonerion ar standilhon e-keñver pep departamant :

Grafik n°8 : Dasparzh ar sonerion dre departamant




Aze hon eus kemeret ar frankiz da lakat Liger-Atlantel er studiadenn evel un departamant Breton ha lakat ur rummad “all” evit hiniennoù zo é tonet a lec’hioù all e bro C’Hall, èl Boulogn, Poitier, Mulhouse, Bourdel pe c’hoazh Pariz. Ret eo diwall mat doc’h an disoc’hoù-se, kar amañ e vez kavet muioc’h a sonerion e Morbihan evit e Penn-ar-Bed. Gwelet a vez aze bevennoù ar studiadenn mañ. En holl e vez kavet 49 bagad e Penn-ar-bed pa ne vez ket kavet nemet 26 er Morbihan, diboellek eo neuze kaout seurt sifrou.⁵² Displeget a vez kement a-drugarez d’ar boblañs sonerion o deus respontet d’ar c’houlennaoueg. Daoust

⁵² Hervez listenn ofisiel ar bagadoù e kemer perzh e 2016, stagadenn n°3

ma ez eo bet kaset ar c’houlennoù da tout ar bagadoù e Breizh a-drugarez da rouedad Sonerion ez eus bet respontet muioc’h get sonerion bagadoù ar Morbihan, darempreded liesoc’h ganeomp marse. Gwelet a vez memestra emañ an daou zepartamant-se kalon ar bagadoù, ez-wir e vez kavet ur bochad bagadoù àr aodoù su Penn-ar-Bed ha re ar Morbihan. Diaesoc’h eo evit departamantoù Aodoù-an-Avor, Il-ha-Gwilen ha Liger-Atlantel lerc’h ma vez kavet a-geteb 11, 11 ha 4 bagad.⁵³ Pezh a zispleg an diforc’h a niver ken bras. Tu zo da da welet ivez an diforc’h bras etre Breizh-Izel ha Breizh-Uhel e-keñver an niver a sonerion hag an niver a vagad dreist-holl.

Studiet hon eus ar liveoù sokial ha gwelet a vo bremañ e peseurt metoù e vev ar sonerion bagadoù. Gwelet hon eus mat penaos e oa bet liammet e-pad hir amzer an sonerezh hengounel get ar maeziou a-raok an Eil Brezel Bed, padal e oa bet adsavet ar “*clique*”-où kentañ e kerioù pennañ ar vro goude ar brezel. Studiomp neuze metoù beviñ ar standilhon :

Grafik n°9 : Dasparzh metoù beviñ ar sonerion



Merzet a vez doc’htu penaos emañ niver brasañ an dud atreset e veviñ e ker, 266 hinienn en holl. Met an dregantad a dud e veviñ àr ar maeziou a chom uhel memestra, hervez sifroù “Bretagne environnement” bet embannet e 2008 e oa 28,6% ar boblañs Breizh a oa àr ar maezou.⁵⁴ Staget eo neuze atav sonerezh Breizh d’he maeziou.

Lakaet hon eus aze àr-wel desverkoù brasañ ar sonerion e mesk ar bagadoù en un doare sokiologel da vat. Dielfennomp bremañ peseurt benveg a vez sonet get sonerion ar stantdilhon.

Savet eo bet ar grafik da heul diàr ar goulenn lies- respont “*De quel instrument jouez-vous au sein du bagad ?* ” lec’h ma veze kavet c’hwec’h respont posubl. Embannet eo bet

⁵³ Hervez listenn ofisiel ar bagadoù e kemer perzh e 2016

⁵⁴ Evolution de la population urbaine et rurale en Bretagne entre 1954 et 2008, [Sellet d’an 12/07/2017] , àr an URL <<http://www.bretagne-environnement.org/Media/Donnees/Donnees/Evolution-de-la-population-urbaine-et-rurale-en-Bretagne-entre-1954-et-2008>>


neuze àr ar grafik-mañ an niver a zegouezhioù hep dregantad ebet. Ez-wir e vez kavet 523 darvoud en holl evit ar goulenn-se. Abaoe m'emañ bet kemmet reolennadur ar c'honkourioù e 2016 evit 70 blez ar BAS e vez aotreet ar benvegoù all er bagadoù setu perak hon eus kavet poellek digoriñ ar goulenn-se da sonerion benvegoù all. E mesk ar benvegoù all e vez kavet da skouer : sonerion biniou-kozh, akordeoñs kromatek, veuze, klarinetenn pe c'hoazh korn-heson. Meur a soner a oar penaos soniñ meur a venveg kavet er bagad, kemeromp skouer soner e Bagad Melinerion Gwened, Ewen COURIAULT, hag a zo gouest da soniñ bombard ha biniou-bras.

Grafik n°10 : Dasparzh ar benvegoù implijet get ar sonerion



A-drugarez d'ar grafik-mañ e c'hellomp lakat en a-raok ez eus kalz muioc'h a sonerion bombard er standilhon get 265 hinienn. Gwir eo ar fed e vehe muioc'h a sonerion bombard en ur bagad met aze eo re vras an diforc'h etre ar bombardoù hag ar biniou-bras. Kemeromp skouer Bagad Sonerion An Oriant, a c'hell bout kemeret èl ur bagad aozet èl al lod vrasañ ag ar re all, evit konkour kentañ rummad miz Eost 2017, e-lec'h ma veze kavet sifroù kempouezetoc'h :

Grafik n°11 : Aozadur Bagad An Oriant evit kenskrivadeg 1añ rummad



Ur wech c'hoazh e vez lakaet àr-wel bevennoù ar studiadenn. Evit keñveriiñ c'hoazh ar sifroù bet embannet er studiadenn-se get sifroù all e c'hellomp sellet doc'h ar re bet embannet get Aurelien LE GAL a-barzh *Ar Soner*. N'eo ket bet savet e studiadenn àr ar memes stumm ha dispakiñ a ra e zisoc'hoù get dregantadoù :

- Bombard : 43.7 %
- Biniou-bras : 30.2 %
- Taboulinoù : 24,8 %
- Respont ebet : 1.4 %⁵⁵

Tu zo da da gloziñ memestra en ur lâret emañ evit pep studiadenn, ar sonerion bombard ar re niverusañ e mesk ar bagadoù.


Goude bout bet studiet respontoù ar goulennoù àr identelezh sonerion ar standilon ha goude bout bet keñveriet un nebeud disoc'hoù get ar re bet embannet e 2003 get Aurelien LE GAL er gelaouenn *Ar Soner* e welomp bremañ sklaeroc'h piv eo poblañs hollek ar standilhon dastumet a-drugarez d'ar c'houlennaoueg.

Oc'hpenn ur sell hollek e c'hellomp bremañ sevel dremm pe personelezh ar soner-skouer er bagadoù. Ar soner-skouer-se a zo neuze ur paotr etre 20 ha 39 blez, tapet un diplom skol-veur getañ, a zo, pe studier pe implijad, e veviiñ e koublad met hep kaout bugel ebet, e veviiñ kentoc'h e kêr er Morbihan pe e Penn-Ar-Bed hag é soniiñ bombard.

A-raok mont pelloc'h get ar studiadenn e vo sellet penoas eo bet lusket diviz hiniennoù ar standilhon evit mont er un bagad. Lâret eo bet meur a wech, met staget eo ar bagadoù a-fed istor doc'h ar yezh ha doc'h an hengoun. Lâret hon eus ivez e oa bet ur seblant troc'h evit lod sonerion get ar liammoù-se. Respont a ra ar grafik da heul d'ar goulenn "*Vous jouez dans un bagad par* " :

⁵⁵ Ar soner n°371 p.16

Grafik n°12 : Luskadurezh ar fed soniñ en ur bagad



Savet a oa bet ar bagadoù e penn kentañ get skipailh Polig MONJARRET evit kas da benn ur gwir arouez politikel ha kazi broadelour met kemmet eo mat an traoù hiriv an deiz. Ar blijadur a vez lakaet èl luskadur kentañ ar sonerion. Ha gwir eo emañ ret d’ar sonerezh bout ur blijadur. Gwelet a vez ivez emañ tost kalon ar sonerion da sonerezh hengounel Breizh. Evit lod izili emañ ar bagad estroc’h evit ur laz-soniñ èl ar re all, rak gwriziennet eo a-barzh ur serten hengoun. Lakaet a vez muioc’h en a-raok ar fed soniñ ha kaset eo bet ar fed difenn an hengoun èl luskadurezh dewezhañ ar sonerion evit soniñ en ur bagad. N’eo ket ken un akt politikel, èl ma veze gwelet ur mare zo.

b- Ar vrezhonegerion oberiant


Goude bout bet studiet ar standilhon hollek ha lakaet àr-wel personelezh ar soner-skouer er bagadoù e vo studiet bremañ un tamm hiroc’h piv eo ar vrezhonegerion er bagadoù.

Kondisionet eo bet ar c’houlennaoueg get respont ar goulenn kentañ “*Vous parlez Breton ?*” lec’h ma oa pevar respont posubl : “mat-tre”, “mat a-wac’h”, “un nebeud gerioù” pe “tamm ebet”. Evit ar labour-se, hag en ur heuliñ doareoù Fañch BROUDIC, hon eus savet tri rummad disheñvel :

Bodet hon eus an hiniennoù hag o deus respontet “mat-tre” pe “mat a-wac’h” edan un is-poblañs anvet ar vrezhonegerion oberiant, strollad an hiniennoù o deus respontet “un nebeud gerioù” a vo anvet is-poblañs ar vrezhonegerion gouzañvus, hag anvet e vo ar strollad diwezhañ, da lâret eo an hiniennoù o deus respontet “tamm ebet”, is-poblañs an nann-vrezhonegerion.

Divizet hon eus lakat an hiniennoù o deus repontet “*un nebeud gerioù*” e mesk ar vrezhonegerion gouzañvus goude bout bet tretet ha sellet doc’h hollad o respontoù. Anat e oa bet respontet an degouezh-se get tud ha na ouie nemet gerioù anavet get an holl, èl “Demat”, “Kenavo” pe c’hoazh “Yec’hed mat”, kazi nul e oa o frekañs implij evit lod brasañ anezhe. Er pennad mañ e vo traetet neuze nemet ar vrezhonegerion oberiant. Setu grafik ha taolenn tennet ag ar goulenn kentañ evit kaout ur sell hollek àr respontoù ar boblañs.

Grafik n°13 : Implij ar brezhoneg get ar sonerion



Gwelet a vez àr ar grafik a-us penaos ez eus neuze 28% ag ar poblañs hollek e mesk ar vrezhonegerion oberiant, pa vez 37% e mesk ar vrezhonegerion gouzañvus ha 35% e mesk an nann-vrezhonegerion. Tu zo da spisaat an displegadenn mañ en ur lâret ez eus 72% ag ar boblañs hollek ha ne ouiant ket ober get ar brezhoneg. Evit bout sklaeroc’h emañ a-bouez sellet spis doc’h taolenn ar grafik.

Taolenn n°13 : Implij ar brezhoneg get ar sonerion


Ha komz a ret brezhoneg ?		
	Koskor absolut	Koskor relativ
Mat tre	65	13,6%
Mat a walc'h	67	14,0%
Un nebeud gerioù	177	37,0%
Tamm ebet	169	35,4%
Hollad	478	100,0%

Sklaeroc’h eo get ar sifroù evit kompren gwelloc’h peurest ar studiadenn. Er pennad-mañ ne vo komzet nemet ag ar vrezhonegerion oberiant, da lâret eo e vo standilhonet ar

standilhon hollek evit gouarn un iz-poblañs 132 hinienn nemetken, da lâret eo 28% ag ar boblañs hollek.

A-raok mont da studial dre ar munud penaos e vez implijet ar brezhoneg get sonerion ar bagadoù ez eomp da welet piv eo ar vrezhonegerion-se. Da gentañ penn e vo studiet, neuze, reizh ar vrezhonegerion get ur grafik hollek heuliet get un daolenn resisoc'h.

Grafik n°14 : Dasparzh reizh ar vrezhonegerion oberiant



Taolenn n°14 : Dasparzh reizh ar vrezhonegerion oberiant

Dasparzh ar brezhonegerion e-keñver o seks hag o live		
	Mat a-walc'h	Mat-tre
Plac'h	31	17
Paotr	35	48
Hollad	66	65

A-drugarez d'ar grafik ha d'an daolenn a-us ez eus tu da embann un nebeud disoc'hoù c'hoazh. Gwelet a vez emañ un tamm uheloc'h dregantad ar merc'hed a ouia brezhoneg, 37%, evit dregantad ar boblañs hollek, 31%. Tu a vehe neuze da lâret emañ dioroet muioc'h ar brezhoneg get ar merc'hed e bed ar bagadoù. Met pa vez sellet an degouezhioù resis en daolenn e vez merzet un dra all. Kazi kempouez eo an niver paotred/merc'hed a ra mat a-walc'h get ar brezhoneg, 35 ha 31 hinienn. Pa vez bras tre an diforc'h get ar re a lar e reont mat-tre get ar yezh, 48 paotr evit 17 plac'h. Ur wech c'hoazh eo diaes mat kaout ur respont da gement sifr.

Da bep hinienn a oa da varniñ e live yezh en ur respont d'ar c'houlennaoueg. Tu zo da soñjal neuze e vehe bet is-barnet pe uhel-barnet un nebeud liveioù. Pezh a c'helle respont d'un diforc'h ken bras. Diaes eo tenniñ ur perzh fetis get an data-se evit poent, kendalc'homp


hon enklask en ur genveriiñ oad ar vrezhonegerion oberiant get oad ar boblañs hollek a-drugarez d'an div daolenn kavet edan.

Kenveriadenn an daolenn n°15 get an daolenn n°2 : Oad an boblañs hollek get oad ar vrezhonegerion oberiant

Oad ar vrezhonegerion oberiant			Oad ar sonerion		
Blezaad	Koskor absolut	Koskor relativel	Blezaad	Koskor absolut	Koskor relativel
< 15 blez	12	9%	< 15 blez	30	6,28%
15-19 blez	14	11%	15-19 blez	52	10,88%
20-39 blez	82	63%	20-39 blez	261	54,60%
40-59 blez	20	15%	40-59 blez	114	23,85%
> 60 blez	3	2%	> 60 blez	21	4,39%
Hollad	131	100%	Hollad	478	100,00%

Kavet a vez traoù dedenus en ur genveriiñ spis an div daolenn-mañ. Krogomp da gentañ penn sellet doc'h linenn ar hiniennoù edan pemzek vlez. Merzet a vez penaos ez eus 12 hinienn àr 30 a oarc'h ober get ar brezhoneg da lâret eo 40% ag an is-poblañs se a ra get ar brezhoneg. Tu zo da liammañ an disoc'h-se get diorroadur ar sistemoù skol divyezhek publik, prevez pe Diwan e Breizh. N'eo ket ken gwir ar feur-se evit ar renkadoù oad all, daoust d'ar renkadoù 15-19 vlez ha 20-39 lerc'h ma vez kavet memestra 30% eus an is-poblañsoù hollek e implij ar yezh. A-drugarez d'ar chifroù-se e c'hellomp ijina e kreskay tamm ha tamm an niver a vrezhonegerion e-mesk ar bagadoù. Dreist holl pa vez gwelet n'eus nemet 17,5% ag is-poblañs ar renkad 40-59 blez ha 14% ag an is-poblañs oc'hpenn 60 vlez e ober get ar brezhoneg. Sellomp bremañ dasparzh ar vrezhonegerion hervez an oad hag ar reizh :


Grafik n°16 : Dasparzh ar vrezhonegerion oberiant hervez an oad hag ar seks



Gwelet a vez c'hoazh ur wech penaos emañ digempouez an dasparzh-se. Ar rummadoù edan pemzek, 15-19 vlez ha 20-39 vlez a zo tost a live, 42%, 50% ha 38% ag ar merc'hed a implij ar brezhoneg er renkadoù-se. Diskenn a ra an dregantad-se seul ma vez studiet ar renkadoù oad koshoc'h.

Stadet hon eus identelezh ar vrezhonegerion oberiant e bed ar bagadoù hervez o oad hag o seks, deomp bremañ da welet penaos emañ tres micherel ha mard eo liammet get personelezh ar soner-skouer bet savet uheloc'h.


Grafik n°17 : Live diplom ar vrezhonegerion oberiant



Damheñvel eo grafik live diplom ar vrezhonegerion oberiant doc'h hani ar boblañs hollek (grafik n°4). Koulskoude a vez kavet nebeutoc'h a ziplomoù micherel kempouezet get muioc'h a ziplomoù skolveuriek. C'hoazh ur wech emañ ret diwall doc'h esplegadenn ar goulenn-mañ ha dreist-holl get esplegadenn an degouezhioù “Brevet” ha “Diplom ebet”, respontet an degouezh “Diplom ebet” get bugale n'int ket c'hoazh diplomet ha memes get liseidi o deus da ma soñj respontet re vuan d'ar c'houlennaoueg hep lenn tout ar repontoù posubl.

Dibosubl eo diforc'hiñ get ar grafik-mañ ar vrezhonegerion eus ar boblañs hollek. Studiet a vo bremañ peseurt labour a vez graet get an is-poblañs goude o studioù:

Grafik n°18 : Dasparzh labour ar vrezhonegerion oberiant



Merzet a vez doc’htu emañ disheñvel da vat an disoc’hoù embannet àr ar grafiek-mañ get ar re embannet àr ar grafiek n°5. Kavet a vez aze renkad ar studierien get ar brasañ niver a zegouezhioù pa ez eo tost kevatal o niver get re an implijidi er boblañs hollek. Gwelet a vez e tremen renkad an implijidi d’an trede renk, pa grap hani ar skolaerien ha kelennerien da eil plas ar labourioù get is-poblañs ar vrezhonegerion. En ur vont donoc’h er studiadenn e vez merzet ez eus 42 studier, da lâret eo 43% eus o is-poblañs hollek, ha 26 skolaer pe kelenner, da lâret 44% eus o is-poblañs hollek, a ra get ar brezhoneg. An daou gennad-se a zo metoù lañsus evit implij ar brezhoneg er bagadoù. Un dra vat eo gwelet kement a studierion, a skolaerion, a gelennerion hag a implijad hag a ra get ar yezh dre ma c’hellont treuskas skeudenn sirius ar yezh da izili all ar bagadoù. Pezh a vez displeget mat get Yannig AUDRAN, bet soner e Kerlenn Pondi ha skolaer :


“Forzh penaos eo arabat rediñ an dud da vont get ar brezhoneg, met hon perzh deomp ni brezhonegerion eo reiñ c’hoant d’ar re all deskiñ ha dreist holl ober get ar yezh, ober get hon yezh”⁵⁶

Merzet vez en tu kontrol emañ izel kenañ an niver a vrezhonegerion er gennadoù labour all. Ret eo kontiñ àr tout ar yaouankiz hiriv an deiz : ar skolidi, ar skolajidi, ar liseidi hag ar studierion evit gallet plantiñ muioc’h a vrezhoneg er bagadoù.

Goude bout bet merzet e oa kaset implij ar brezhoneg get gennadoù resis tre e vo studiet dasparzh ar brezhoneg dre zepartamant :

⁵⁶ Tennaet eus un emgav get brezhonegerion Kerlenn Pondi d’an 20 a viz Genver 2017

Grafin n°19 : Dasparzh ar vrezhonegerion oberiant dre departamant



Dedennus eo ar grafik-mañ kar lakat a ra àr-wel an harz yezhel. Ne vez ket kavet kalz a vrezhonegourion nag en Il ha Gwilen nag e Liger Atlantel. Kavet a vez memes muioc’h a vrezhonegourion e departamantoù maez eus Breizh. Poellek eo lakat àr-wel, daoust d’ar pezh a oa bet displeget evit ar grafik n°8 e-keñver an dastumadeg goulennaoueg, e seblant sonerion bro Wened ober muioc’h get ar brezhoneg evit re Penn-ar-Bed pe re Aodoù-an-Arvor. Evit displegiñ kement-mañ, emañ ret sellet spis doc’h istor un nebeud bagadoù eus ar Morbihan. Staget eo istor Kerlenn Pondi ha Bagad Roñsed-Mor get ar brezhoneg ha c’hoazh hiriv e vez kavet ur bochad bezhonegerion en o zouesk. Ar Gerlenn a zo bet savet e 1953 pa oa en em vodet un nebeud sonerion evit ar blijadur ha ne chom ket kalz ag ar strolladoù, bagadoù pe kelc’h-keltiek, a zo chomet bev hiriv an deiz. Chomet eo ar Gerlenn en e sav dre m’emañ bet desket a rummad da rummad pouez ar yezh hag an hengoun :

“Mes da betra bout mestr-soner pe tad-dañsour ma ne ouit ket penn d’ar pezh a ra braventez ha personelezh ho pro? Get deskiñ ha difenn hor sevennadur-ni emañ daet Kerlenn Pondi da vout ur strollad gwriennet don en e vro ha troet muioc’h evit biskoazh àr an amzer da zonet”⁵⁷

Chomet eo c’hoazh ar skol vuhez-se, èl m’hon eus bet tro da wiriekaat, e-pad ar pennad enklask, goude bout bet kejet get ur pemzek soner bennak, a oad disheñvel, a ouie brezhoneg, evit eskemm àr stad ar brezhoneg er bagadoù.


⁵⁷MORGANT Armel, « Kerlenn Pondi, Kalon ha begon », , coop Breizh, 2013 p.36

An eil bagad stag doc'h ar brezhoneg er Morbihan eo hani Roñsed-Mor Lokoal-Mendon bet savet e 1969 get Alan AR BUHE, bet president ar BAS etre 1991 ha 1998. Du-se ivez eo chomet stag mat ar sonerion doc'h ar yezh. Degemeret oa bet memes Ar Redadeg e 2016 get gouelioù bagad Lokoal Mendon.

Setu un nebeud titouroù a c'hellehe displegiñ perak ez eus kement a sonerion brezhonek er Morbihan.

Sellomp bremañ ma vez ur gorreladenn bennak etre ar fed d'ober bet ar brezhoneg hag ar fed da soniñ ur benveg. Evit ar studiadenn-mañ hon eus divizet tenniñ kuit ar benvegoù all bet implijet.

Grafin n°20 : Ar benvegoù implijet get ar vrezhonegerion oberiant



Diaes eo gwelet un diforc'h sklaer pa lenner ar grafik mañ hag ar grafik n°10. Merzet a vez c'hoazh ez eus muioc'h a sonerion bombard en is-poblañs-se. Neoazh hon eus bet merzet e-pad an enklaskoù penaos e oa un diforc'h bras ar sell an hengoun hag ar yezh hervez ar benveg. Skouerioù hon eus bet gwelet lakaomp e Kerlenn Pondi e-lec'h ma ne oa nemet ur soner biniou-bras en emvod ha tabouliner ebet. E Bagad An Oriant emañ heñvel, bez zo en holl eizh soner bombard a ouia brezhoneg pa na vez nemet daou soner biniou-bras hag un tabouliner.

Graet a vo bremañ sintezenn identelezh ar brezhoneger oberiant skouer. Chom a ra an identitelezh-skouer tost-tre da hani ar boblañs hollek, da lâret eo ur paotr etre 20 ha 39 vlez bet tapet un diplom skolveuriek getañ met studier atav é vevañ e koublad hep bout dimezet met er Morbihan. Savet hon eus drem-skouer ur brezhoneger en ur metoù resis ha poellek eo mont da geñveriañ an dremm-se get identitelezh ar brezhoneger skouer e Breizh a-bezh bet

savet get Fañch BROUDIC a-barzh e studiadenn *Parler breton au XXIème siècle*. Ar brezhoneger skouer e Breizh a zo neuze ur plac'h oc'hpenn tri blez ha tri-ugent, dimezet, hep diplom ebet e vevñ e departamant Penn-ar-Bed. Da lâret eo kontrol mik ar pezh a vez kavet e bed ar bagadoù.

Er pennad8mañ hon eus bet tro da studial identitezh hollek ha skouerius poblañs sonerion ar bagadoù. Da heul hon eus klasket gwelet ma oa un diforzh etre ar boblañs hollek-mañ hag is-poblañs ar vrezhonegerion oberiant er bagadoù, ha stadet hon eus e oa bihan a walc'h an diforc'hoù etreze.

III- Implij ha sell ar sonerion àr ar brezhoneg


Stadet hon eus er poent daou e oa izel a-walc'h dregantad ar vrezhonegerion e bed ar bagadoù. Studiet a vo bremañ implij ha sell hollad ar sonerion àr ar yezh. Kroget a vo da gentañ penn en ur welet penaos e vez implijet ar yezh get ar vrezhonegerion oberiant, a-raok studial sell hollad ar sonerion àr ar yezh.

1- Implij ha deskadurezh ar yezh get ar vrezhonegerion oberiant

A-bouez eo, a-raok mont da studial hollad ar boblañs gwelet penaos e vez implijet ar yezh get ar sonerion brezhoneger. Studiet a vo penaos emañ bet desket ar yezh get an hiniennoù ha penaos e vez implijet ar yezh gete er vuhez pemdeziek hag e bed ar bagadoù.

a- Deskiñ ar yezh


Grafik n°21 : Dasparzh doareoù deskiñ ar brezhoneg get ar vrezhonegerion oberiant




A-raok studial ar grafik-mañ eo pouezus lâret e oa ur goulenn get meur a respont posubl. Setu perak e vo komzet a zegouezhoù.

A-drugarez d’ar grafik-mañ e vez gwelet mat pouez an hentennoù Diwan pe Diyezh àr dachenn implij ar brezhoneg er bagadoù. En holl ez eus bet respontet 71 wech unan eus an daou degouezh mañ. Lakaet a vez splann amañ ivez pouez ar stummadurioù hir evit an oadourion. N’hon eus ket gellet dastum sifr ebet àr an dachenn-mañ met gwelet a vez muioc’h mui a sonerion e teskiñ brezhoneg er stummadurioù hir-se kinniget un tamm e pep lec’h er vro. An disoc’hoù mañ a c’hell displegiñ bremañ perak ez eus bet kement a dud e respont get an degouezh brezhoneg “Standard” àr ar goulenn da heul. Kaset eo bet dija fed struzerezh Diwan àr ar pouez-mouezhoù, komzomp bremañ eus ar stummadurioù hir. Él rezon emañ diaes deskiñ ur yezh hep ur soubidigezh klok, a-lies mat e vez diaes d’an oadourion diviz hag choaj ur pouezh mouezh resis. Souezhus a-walc’h eo gwelet kement a respontoù get an degouezh “Get o zud”, tu zo da soñjal emaint brezhonegerion a-vihanig. En degouezh “All” hag a oa ur respont digor ez eus bet kavet respontoù èl “get ma bugale”, “get mignoned” pe “er bagad”. Evit spisaat c’hoazh ar poent-mañ hag evit rein respontoù d’ar martezeadennoù bet savet e vo studiet doareoù deskiñ ar brezhoneg dre renkad oad.


Grafik n° 22a : Deskadurezh ar brezhoneg evit ar renkad oad <15 vlez




Grafik n° 22b : Deskadurezh ar brezhoneg evit ar renkad oad 15-19 vlez




Grafik n° 22c : Deskadurezh ar brezhoneg evit ar renkad oad 20-39 vlez



Grafik n° 22d : Deskadurezh ar brezhoneg evit ar renkad oad 40-59 vlez



Grafik n° 22e : Deskadurezh ar brezhoneg evit ar renkad oad > 60 vlez



Studiomp bremañ grafik dre grafik ha krogomp evel-just get ar grafik n°22a ha studial ar renkad oad edan pemzek vlez. Disoc'hoù ar grafik-mañ a zo da vat ar perh a oa bet raktreset er martezeadennoù bet savet en a-raok. Laket a vez en a-raok pouez ar skol, dre an hentadoù Diwan pe divyezhek, e deskadurezh modern ar brezhoneg. Kavet a vez memes tra un nebeut, pemp degouezh, a zo bet desavet splann e brezhoneg get o zud hag un degouezh lec'h ma vez kavet un hinienn bet desket e brezhoneg get e zud kozh.

Ar memes kentel a vez tennet ag ar grafik n°22b. Pouez an hentadoù skol e brezhoneg a zo ur wech c'hoazh pouezus tre e deskadurezh ar grennarded, oc'hpennet get treuskas ar familh. Merzet a vez memes tra donedigezh daou zegouezh “Get kentelioù noz”.

Ar grafik n°22c eo an hani talvoudusañ. Kavet a vez c'hoazh ur wech asuradennoù d'ar martezeadennoù bet savet ganeomp. Gwelet hon eus dija e oa is-poblañs ar rummad oad 20-39 vlez an hani niverusañ da lâret eo an hani talvoudusañ. Talvoudus dre ma vez liammet aze rummadoù skolidi bet desket en hentenoù Diwan ha divyezheg ha tud bet desket dre kentelioù noz pe stummadurioù hir. Ez-wir eo bet krouet Diwan e 1977 ha Divyezheg e 1979. Da lâret eo emañ tost ar skolidi kentañ er rummad oad a-us. Heuliiñ a ra an disoc'h an arguzennoù bet embannet a-us. Aze e vez kavet tost kement a dud bet desket ar brezhoneg gete a-drugarez d'ur stummadur hir, 34 degouezh, evit tud bet desket dre ar skol, 30 evit Diwan ha 15 evit Divyezheg (45 degouezh en holl). Izel eo niver an degouezhioù “kentelioù noz”. Kavet a vez muioc'h a dud bet desket brezhoneg get o familh, 25 degouezh en holl. Aze e kemm an displegadurioù un nebeudig. Él rezon, a-barzh an degouezhioù mañ ez eus tud a zo bet desavet e brezhoneg, met evit ar wech kentañ ez eus tu da stadiñ o desket hinienoù zo, get o zud kozh hag o zud goude bout bet graet o stummadur hir. Evit ar wech kentañ er studiadenn mañ e vez gwelet ur furm treuskas nevez.

Ar furm-se a vez adkavet get ar rummad oad da heul. Ingal kenañ eo an niver a zegouezhioù dre respont. Kavet a vez memestra un doare nevez da zeskiñ : “Get o bugale”. Implijet a vez aze deskadurezh ar vugale èl un digarez da zeskiñ ar brezhoneg. An div hinienn o deus respontet get “ Get o bugale” o deus respontet ivez “kentelioù noz” hag unan en deus memes respontet oc'hpenn “Get ur stummadur 6 miz pe +”.


Grafik an renkad oad oc'hpenn 60 vlez a zo diaesoc'h da studial dre ma vez ket kalz a zegouezhioù, 7 en holl. Diaes eo neuze bout gouest da dermeniñ traoù. Merzet vez memestra n'eus ket hani ebet en deus bet respontet “Get o zud kozh” ha daou nemetken “Get o zud”.

A-drugarez d'ar studiadenn spisetañ hon eus gallet lakaat àr-wel spisverkoù deskadurezh ar yezh hervez an oad, er bagadoù met perak pas ivez e bed ar brezhoneg en un doare hollekoc'h.

b- Ober get ar yezh

Bremañ m'emañ bet displeget modoù deskadurezh ar yezh get ar vrezhonegerion oberiant er bagadoù ez eomp da studial a dostoc'h penaos a vez implijet ar brezhoneg gete. A-raok studial an implij dre gomz e vo sellet penaos e vez implijet ar skritur hag ar lenn e brezhoneg.

Grafik n°23 : Dasparzh implij ar lenn e brezhoneg




Stadet a vez aze ez eus 7,6% ag is-poblañs ar vrezhonegerion get diaestaerioù àr dachenn ar lenn pa vez 40,9% hep diaester ebet. En ur geñveriiñ an disoc'hoù-se get ar re bet embannet get Fañch BROUDIC⁵⁸ e vez merzet n'eo ket ken souezhus a-se. Bez zo eus kudenn ar lenn e brezhoneg, sklaer eo, met ret eo lakaat en a-raok penaos emañ izeloc'h dregantad ar vrezhonegerion get diaesterioù e-mesk ar sonerion evit e-boblañs Breizh a-bezh, stadet da 11% get Fañch BROUDIC. Merzet a vez ivez penaos emañ kalz uheloc'h dregantad an dud hep diaester er bagadoù e-keñver an dregantad bet embannet e 2007, 12% d'ar mare-se nemetken. Poellek eo lakat àr-wel c'hoazh ur wech emañ ar bagadoù ur metoù lec'h m'emañ desket an dud. Gwelet a vez aze ez eus memestra 92,1% eus is-poblañs ar vrezhonegerion a c'hell lenn hep re a ziaesterioù pa oa nemet 36% eus brezhonegerion Breizh a ouie en ober e 2007.

⁵⁸ BROUDIC Fañch, *Parler breton au XXIème siècle, Le nouveau sondage de TMO-Région*, ed. Emgleo Breiz, 2009, p.93 -94

Gwelet a vo bremañ pegent aes eo d'ar sonerion brezhoneger skriviñ o yezh.


Grafik n°24 : Dasparzh implij ar skritur e brezhoneg :



Heuliiñ a ra tamm pe damm disoc'hoù implij ar skriviñ hag ar lenn. Kavet a vez memestra un dregantad un tamm brasoc'h get diaesterioù evit skriviñ, 13,7%. Ur wech c'hoazh e vez stadet emañ disheñvel poblañs ar bagadoù doc'h poblañs Breizh, dre ma ne oa nemet un drederenn, 37% eus ar boblañs a oa gouest skriviñ e brezhoneg e 2007 pa vez memestra 86,2% eus ar sonerion gouest d'en ober hiriv an deiz.

Lakaet hon eus ar-wel c'hoazh ur wech e oa sonerion ar bagadoù tud desket, e-keñver studioù hag e-keñver ar fed da implij binvioù ar lenn hag ar skriviñ e brezhoneg. Ur perzh mat eo mestrioniñ an oustilhoù-se met pouezusoc'h eo memestra ober get ar yezh. Studiet e vo neuze implij ar brezhoneg dre gomz er ur grogiñ get studiadenn frekañs implij ar yezh.


Grafik n°25 : Frekañs implij ar brezhoneg get ar vrezhonegerion oberiant



Merzet a vez aze e vez memes-tra implijet kalzig a-walc’h ar brezhoneg er pemdez get ar sonerion. 70% anezhe a lâr implij ar yezh en un doare ingal, pe bemdez pe alies. Diaesoc’h diaesañ eo kaout un digarez er vuhez pemdeziek da implij ar brezhoneg pezh a c’hell displeg perak ez eus kement a dud o respont get an darvoud “ A-wechoù”. Ne gredomp ket eo ret kemer e kont ar repont “morse” dre ma vez kavet nemet teir respont eus an darvoud-se.

Deomp bremañ da studial peseurt pouez-mouezh ha peseurt brezhoneg a vez implijet a sonerion ar bagadoù.

Grafik n°26 : Dasparzh ar pouez mouezh implijet get ar vrezhonegerion oberiant




Gwelet a vez doc’htu pouez bras brezhoneg Bro-Wened er boblañs studiet. N’eo ket ken souezhus a-se dre n’hon eus gwelet tuchant e oa en holl 82 brezhoneger eus ar Morbihan, aze eo 51 hinienn eus an is-poblañs ar Morbihan, da lâret eo 85%, o deus lâret implij brezhoneg Bro-Wened. An dedenusañ evidomp eo gwelet pouez an darvoud “Standard” (29%), e-keñver brezhoneg Bro Gerne (14%), Bro Leon (9%) ha Bro Dreger (9%). Dilaosket eo bet ar pouez-mouezhioù lec’hel evit implij ur brezhoneg standardekaet hag embannet a vez sklaer get an hiniennoù. Tu zo da liammañ ar fed-se, get an niver a studierion hag a zeskarded àr ar brezhoneg hag o deus respontet d’ar c’houlennaoueg. Gwelet a vez-se a lies, e Diwan da skouer, lec’h ma vez dilaosket aezetoc’h ar pouez-mouezhioù brezhoneg lec’hel evit ur brezhoneg platoc’h ha divlaz get al lod vrasañ eus tud yaouank e Bro Gerne, Bro Dreger pe bro Leon, pa chom pouezusoc’h identitezh ha blaz brezhoneg bro Wened evit al lod brasañ eus ar gomzerion yaouank.

Deomp bremañ da welet penaos ha dreist holl get piv e vez implijet ar yezh get yezhourion ar bagadoù. A-raok displegiñ ar grafiek da heul emañ ret kompren penaos eo bet savet ar goulenn. Savet a oa bet ur goulenn orin “*Parlez vous le Breton? Avec ...*” hag e veze

kinniget unnek kinnig posubl. Da bep kinnig e oa ret respont Ya, Ket pe diverniet. Setu neuze aze disoc'hoù spisaet evit pep kinnig :

Grafik n°27 : Get piv e vez implijet ar brezhoneg get ar vrezhonegerion oberiant



Gellout a reomp tenniñ un nebeud kentelioù ag ar grafik-mañ. Tuchant hon eus lakaet ar gomz àr an deskadurezhioù familh hag ar vrezhonegerion a-vihanig. N'eo ket ken anat-se àr hollad is-poblañs ar vrezhonegerion. Gwelet a vez mat penaos ne vez ket komzet brezhoneg get ar gerent get al lod brasañ ag an hiniannoù. Souezhus eo ivez gwelet penaos ez eus muioc'h a dud o vont e brezhoneg get o zad evit o mamm. Gwelet a vez aze splann a-walc'h e vez memestra muioc'h a vrezhoneg etre breudeur ha c'hoarezed en ur familh. Perzh a zo normal a-walc'h, en ur familh pa vez skoliataet ar c'hoadur kozhañ en un hentenn vrezhoneg e vez skoliataet ar re a zay àr e lec'h. Kendalc'homp get ar familhoù, merzet a vez ivez ne vez ket kalz a vrezhoneg er c'houbladoù, 18% nemetken ag ar c'houbladoù lerc'h ma vez ur vrezhoneger d'an nebeutañ. Él ma ez eo bet lâret dijà n'eo ket ar bagadoù ur metoù lerc'h ma vez kavet kalz a vugale setu perak emañ ken uhel diagram an dud diverniet ha ken izel an daou all, merzet a vez memestra penaos e vez muioc'h a dud o vont e galleg d'o bugale-padal e ouiont brezhoneg. Tu zo da èl rezont liammañ ar fed-se get ar fed ne vehe ket atav savet ar c'houbladoù kerent get daou vrezhoneger, komz a vez amañ eus yezh boaz an ti. Tu zo da lâret sklaer ne vez ket implijet kement ar brezhoneg evit ar galleg e tiegezhioù ar sonerion vrezhoneger. E 2007 e oa bet embannet get Fañch BROUDIG e oa ar familh ar metoù lec'h


ma veze implijet ar muiañ ar brezhoneg⁵⁹. C’hoazh ur wech e vez kavet ur diforc’h bras etre yezhourion polblañs ar bagadoù ha yezhourion poblañs Breizh.

Lakaet hon eus ar gomz àr ar familhoù met dont a ra sklaer penaos eo get ar vignoned e vez implijet ar muiañ ar brezhoneg get ar sonerion, 90% anezhe o deus respontet “ya” d’ar c’hinnig-se. Klokaet a vez ar fed mañ get disoc’h ar c’hinnigoù “Gant tud ar bagad e-pad ar pleustradegoù” ha “Gant tud all eus ar bagad (en diavaez ar pleustradegoù)”. Kar èl rezont emañ ar bagad ur bed mignoned.

Disoc’h àr implij ar brezhoneg er c’hinnig “Er labour”a c’hell bout souezhus met gwelet hon eus penaos e oa pouezus an niver a gelennourion hag a skolerion e mesk iz-poblañs ar vrezhonegerion oberiant. Tu zo da ijin e vez labouret get ar gelennerion-se en hentennoù brezhoneg.

Sellomp bremañ a-dostoc’h doc’h ar respontoù d’ar c’hinnig “implij ar brezhoneg e-pad ar bleustradegoù”. Merzet a vez e vez implijet muioc’h ar galleg get ar sonerion evit ar brezhoneg padal o deus respontet, evit an niver brasañ anezhe, penaos e implijent ar brezhoneg get sonerion all o bagad. En em gavet a reer amañ da vat àr un degouezh diglosiegezh. Kemer a ra ar galleg roll ar yezh uhel pa dremen ar brezhoneg da vout ar yezh izel. Evit mont pelloc’h àr ar sujed-mañ hon eus savet daou c’houlenn d’ar sonerion brezhoneger : “Dans un groupe, si tout le monde sait le breton, vous parlez de préférence ...” ha “ Si quelqu’un dans le groupe ne parle pas le breton, vous parlez de préférence...” ha setu amañ respontoù ar goulennoù-se :


Grafik n°28 ha n°29 : Implij ur yezh en ur strollad



⁵⁹ BROUDIC Fañch, *Parler breton au XXIème siècle, Le nouveau sondage de TMO-Région*, ed. Emgleo Breiz, 2009, p. 122


Embannet a vez aze gwir gudenn ar brezhoneg, daet eo da vout ur yezh izel er gevredigezh. Sklaer eo ar respontoù, pa vez 57% eus ar vrezhonegerion a implij nemet ar brezhoneg en ur strollad brezhonegerion ez eus nemet 2% en ur strollad get ur galleger nemetken. An degouezh diglosiegezh, kavet er poent mañ, hag a zo par d'ar perzh a vez kavet er gevredigezh a vremañ a gas ac'hanomp da studial bremañ petra eo sell poblañs ar bagadoù àr ar brezhoneg. Met a-raok e vo klasket ma zo ur liamm etre ar fed da gomz brezhoneg hag ar fed soniñ en ur bagad bennak.

Grafik n°30 : Liamm etre ar fed da gomz brezhoneg ha soniñ en ur bagad




Gwelet a vez sklaer a-drugarez d'ar grafiek-mañ penaos n'eo ket liammet en un doare eeun ar fed gouzout brezhoneg ha soniñ en ur bagad. Él rezont vez desachet muioc'h ur brezhoneger a vihanig pe un den bet desavet en hengoun breton davet ar binvioù hag ar sonerezh hengounel. Ur liamm spis a vez kavet memestra en tu all, liammet eo ar fed soniñ en ur bagad get ar fed ober pe bout desachet get deskadurezh ar brezhoneg :

Grafik n°31a : Liamm etre ar fed soniñ en ur bagad hag ar fed komz brezhoneg (brezhonegerion oberiant)



Grafik n°31b : Liamm etre ar fed soniñ en ur bagad hag ar fed komz brezhoneg

(sell ar vrezhonegerion gouzañvius hag an nann-brezhonegerion)



Souezhus eo gwelet ar liamm ken kreñv etre ar sonerion bagadoù hag ar brezhoneg. Merzet hon eus a-hed ar labour e oa bet dilaosket tamm-ha-tamm ar brezhoneg get ar sonerion hag e vez gwelet aze n'eo ket ken anat ar c'holl-se. Kejet hon eus get un nebeud sonerion, e-pad ar pennad enklask, o deus bet kroget ar brezhoneg dre m'o doa kroget get ar bagad, pezh a c'hell displeg an disoc'hoù embannet get ar grafik n°31a lec'h ma vez kavet 59% dedennet get ar brezhoneg a-drugarez d'ar bagad. Disoc'h ar grafik n°31b a c'hell roiñ deomp ur spi bras àr diorroadur plas ar brezhoneg e bed ar bagadoù. Embannet a vez sklaer, 72%, emañ dedennet ar vrezhonegerion gouzañvius hag an nann-vrezhonegerion get ar brezhoneg. Bodet eo bet disoc'hoù an daou rummad evit ar studiadenn-se dre ma oa par o liveoù respontoù.

Ur dra vat eo gwelet penaos emañ dedennet ha liammet ar sonerion get ar brezhoneg. Bout dedennet a zo brav met peseurt sell a vez get hollad ar sonerion àr implij ar yezh en un doare hollek?


2- Sell hollad ar sonerion àr ar yezh

Evit respont d'ar goulenñ bet savet e vo studiet bremañ sell hollad ar sonerion àr implij ar yezh. Da gentañ penn e vo gwelet ar sell àr implij ar yezh er vuhez foran, e-keñver arwech ar yezh, e implij er mediaoù pe c'hoazh e implij en deskadurezh. Da heul e vo spisaet ar studi àr sell implij ar yezh e bed ar bagadoù. Evit ar wech kentañ e vo bodet hollad ar boblañs evit ar studiadenn-mañ.

a- Er vuhez foran

Pouezus eo gouzout hiroc’h àr sell implij ar brezhoneg get ar sonerion goude bout bet stadet e oa staget memestra ar sonerion nann-brezhoneger pe brezhoneger gouzañvus doc’h ar yezh. Kroget a vo ar studiadenn-mañ get sell ar sonerion àr arwech ar brezhoneg en un doare hollek. Evit kaout ur sell spisoc’h àr ar sujed-se hon eus divizet studial ar respontoù hervez ar rummadoù live yezh.

Grafik n°32 : Sell ar sonerion àr arwech ar brezhoneg en un doare hollek hervez o live yezh :




Evit ar goulenn mañ, “La promotion du breton, en général, est-elle, pour vous personnellement quelque chose de...” e oa bet kinniget peder respont posubl en holl, “Prioritaire”, “Important”, “ Sans importance” pe “ A ne pas faire”. Hinienn ebet en deus bet respontet d’an degouezh diwezhañ, n’eo ket bet embannet neuze àr ar grafik. A-raok mont spisoc’h àr displeg an disoc’hoù eo ret resisaat emañ an 2% “didalvoudus” kavet er rummad mat-tre perzh un hinienn nemetken. Tu zo da soñjal neuze e vehe ur respont dilojik.

Merzet a vez aze c’hoazh ur wech emañ stag hollad ar sonerion d’ar brezhoneg, 91,6% eus an hollad a lar eo arwech ar brezhoneg un dra pe priorel pe pouezus. D’ar liesañ eo memestra un dra pouezus hervez ar liveoù yezh. Kavet a vez ar respont “priorel” er brasañ-niver nemet er rummad yezh “mat-tre”. Souezhus eo gwelet emañ ken pouezus arwech ar brezhoneg evit an nann-brezhonegerion, 75% eus o iz-poblañs da lâret eo 126 hinienn.

Troet eo a-du ar sonerion get arwech ar brezhoneg en un doare hollek met daoust hag e vez stag ar boblañs d’ar mediaoù kinniget e brezhoneg? Sellet a vo da gentañ penn ma vez

heuliet an abadennoù radio e brezhoneg. Evit ar grafiek da heul emañ bet tennet an degouezh “Ne sais pas” barnet didalvez (8 darvoud en holl).

Grafiek n°33 : Frekañs selaou abadennoù radio e brezhoneg hervez ar live yezh




N’eo ket aes evit holl boblañs Breizh bout gouest da selaou abadennoù e brezhoneg àr eeun, ez-wir emañ munut a-walc’h an abadennoù e brezhoneg àr ar media-se. Kavet a vez memes-tra ar radioioù kevredigezhel dispaket un tamm e pe lerc’h e Breizh izel, èl Radio Kreiz Breizh, Radio Bro Gwened, Arvorig FM pe Radio Kerne pe c’hoazh àr ar servij publik get France-Bleu Breizh-Izel e-lec’h ma ez eus tu klevet abadennoù e brezhoneg penn da benn bemdez. Diaesoc’h eo evel just evit tud Breizh uhel klevet brezhoneg àr ar gwagennoù, kavet a vez un nebeud abadennoù memestra àr France-Bleu Armorique. Diaes eo neuze kaout ur sell hollek àr an disoc’hoù kinniget àr ar grafiek. Merzet a vez memestra emañ dedennet ar vrezhonegerion gouzañvus get an abadennoù-se, 54,8% eus an iz-poblañs-se a selaou abadennoù e brezhoneg get ar frekañs “a-wechoù”, 40,1% da lâret eo 71 hinienn. Souezhus eo gwelet a-drugarez d’an darpazh-se e vez selaouet muioc’h an abadennoù radio e brezhoneg get ar rummad live “Mat-a-walc’h” evit get re ar rummad “Mat-tre”. Heuliiñ a ra tamm pe damm an disoc’hoù-se ar re bet kavet get Fañch BROUDIC en e studiadenn.⁶⁰

⁶⁰ BROUDIC Fañch, « Parler breton au XXIème siècle, Le nouveau sondage de TMO-Région », ed. Emgleo Breiz, 2009, p.103

Studiet a vo bremañ frekañs sellet doc’h an abadennoù e brezhoneg er skinwel. Evit an disoc’h mañ emañ bet tennet an degouezhioù “Ne sais pas” ha “Tout les jours ou presque ” barnet ur wech c’hoazh didalvez (dek ha un darvoud evit pep degouezh).


Grafik n°34 : Frekañs sellet abadennoù skwinwel e brezhoneg hervez ar live yezh :



Gwanoc’h eo aze frekañs sellet an abadennoù skinwel e brezhoneg. Izeloc’h eo ivez an amzer brezhoneg àr ar media-se. Skignet a vez brezhoneg bemdez get Frañs 3 Hirwazh hepken get an Taol-lagad etre kreisteiz hag un eur d’enderv ha c’hoazh berr mat eo an amzer-se. Diaes a c’hell bout evit an dud hag a labour sellet doc’h ar skinwell da greisteiz, pezh a-zispleg an niver a respont evit an darvoud “Bemdez pe dost”. Kavet a vez an abadennoù brezhoneg all d’ar Sadorn vitin e-pad un eur hanter nemetken. Izel mat eo dregantadoù an hiniennoù a sell doc’h an abadennoù get ur frekañs ar frekañs uhelañ, 4,6% da lâret eo 22 hinienn, kazi kevatal eo an dregantad hag an niver a dud get ur frekañs sellet ur wech ar miz, 4% da lâret eo 19 hinienn. Uhel a-walc’h eo dregantad an hiniennoù a sell a wechoù, marteze dre zegouez, 39,12% eus ar boblañs da lâret eo 187 hinienn.

Izel tre eo frekañs implij ha sellet an abadennoù e brezhoneg get ar sonerion ma vehent brezhonegourion oberiant pe pas. Studiet a vo bremañ implij ar brezhoneg àr ar genrouedad, ar media strevet ar muiañ er bed hag a genstroll an daou vedia bet stuidet a-us. Evit ar goulenn-mañ emañ bet tennet an degouezh “Non, n'a pas d'accès Internet” barnet didalvez (5 darvoud).


Grafik n° 35 : Frekañs implij lec'hiennoù internet evit komz, lenn sellet an abadennoù pe selaou abadennoù e brezhoneg hervez ar livez yezh



Merzet a vez get ar grafik-mañ eo uhel implij ar media-se get ar vrezhonegerion oberiant, 76% eus ar rummad live “mat-tre” ha 64% eus ar rummad live “mat a-walc’h” a implij ar media-se, hag hanter ar rummad live “mat-tre” a implij anezhañ a liaes. E kontroll emañ izel kenañ implij ar media-se get ar rummadoù all e-keñver implij ar mediaoù all.

Studiet a vo bremañ penaos e vez gwelet deskadurezh ar brezhoneg get ar sonerion. Evit ar grafik da heul eo bet tennet an darvoud “Soit interdit” dre ma na oa ket respont ebet.


Grafik n°36 : Sell àr deskadurezh ar brezhoneg en deskadurezh dre live yezh



Merzet a vez ur wech c’hoazh eo staget mat ar sonerion ouzh ar brezhoneg. Daoust ma ne vez ket den ebet enebet da deskadurezh ar brezhoneg ez eus une nebeud re , 15 hinienn, a chom memestra hep ali ebet. Gwelet a vez eo pouezus ar c’hoant e vehe kinniget kelenn ar brezhoneg e pep skol hag an dra-se e pep rummad live yezh, 71% da lâret 338 hinienn en holl. Merzet a vez ivez un dregantad uhel, 42%, e mesk ar rummad live “mat-tre” evit ma vehe ar brezhoneg rediet e pep skol.

A-drugarez d’ar grafik-mañ e vez gwelet sklaer o deus c’hoant ar sonerion gwelet muioc’h a glasoù brezhoneg e skolioù Breizh. Deomp bremañ da welet ma vez lakaet e pleustr ar c’hoant-se get ar sonerion hag o deus bugale en ur studial skoliatadur ar vugale-se. Labouret a vo evit ar studiadenn-se get un niver a 232 darvoud.

Grafik n°37 : Skoliatadur bugale ar sonerion hervez o live yezh



Disheñvel mik eo aze an disoc’hoù doc’h ar pezh hon eus stadet get ar grafik paset. Gwelet a vez n’eo ket skoliataet al lod vrasañ ag ar vugale nann-brezhonegerion e-barzh hentennoù brezhoneg, ha neoazh an tri c’hard anezhe o doa respontet o doa c’hoant da welet ar brezhoneg e pep skol. Kavet a vez memes tra 27 bugel skoliataet e brezhoneg àr an 72 enrollet e is-poblañs an nann-brezhonegerion.

Brasoc’h eo an niver a vugale skoliataet e brezhoneg, 61%, e mesk ar live yezh “un nebeud gerioù”. Tu zo da liammañ ar 17 hinienn eus ar live mañ o deus bet respontet bout bet desket an nebeud brezhoneg get o bugale.

Er c’hontroll emañ izel tre an niver a vugale skoliataet en hentennoù unyezhek galleg e mesk ar vrezhonegerion oberiant. Merzet vez ivez eo izel tre an niver a vugale skoliataet en hentadoù prevez e mesk ar live yezh “Mat-tre”.


Er pennad mañ hon eus bet tro da welet ha da stadiñ penaos e oa staget mat ar sonerion ouzh skeudenn ar brezhoneg. Lod brasañ a zo a-du mik evit arwech ar brezhoneg er vuhez foran. Izel a chom c’hoazh frekañs implij ar mediaoù get ar metoù-se ma vehe brezhonegerion pe pas. Uhel tre eo mesk ar boblañs-se dredantad an dud a-du evit emledadur kinnig ar c’helenn e pep skol er vro. Domaj eo memestra gwelet ne vez ket heuliet da vat ar c’hoantoù-se get an nann-brezhonegerion dre ma vez skoliaet o bugale en hentadoù unyezhek galleg dreist holl. Stadet hon eus bet un nebeud traou àr sell ar sonerion àr implij ar brezhoneg er vuhez pemdeziek. Studiet a vo bremañ o sell àr implij ar brezhoneg e bed hag e metoù ar bagadoù.

b- Er bagadoù

Savet eo bet ar bagadoù da gentañ penn evit saveteiñ sonerezh hengounel Breizh met ivez an hengoun hag ar brezhoneg. Pa oa da gentañ penn ar sonerion arouez ar vro emañ daet tamm ha tamm da vout arouez ur mod sonerezh e Breizh hepken. Gwelet hon oa e oa gwelet mat ar brezhoneg get ar sonerion en un doare hollek. Klasket a vo studial bremañ o sell àr implij ar brezhoneg en o metoù, da lâret eo er bagadoù.

Evit en ober e vo gwelet da gentañ penn petra eo ar liamm etre ar bagadoù hag ar brezhoneg.


Grafik n°38 : Daspazh ar liamm etre ar bagadoù hag ar brezhoneg hervez ar live yezh



Stadet hon eus dija e oa liammet ar fed soniñ en ur bagad ha bout dedennet get ar brezhoneg. Get ar grafik n° 38 e vez kreñvet c’hoarzh ar pezh mañ. Hollad ar sonerion, 85% ag ar boblañs da lâret eo 408 hinienn, a-zo a du evit lâret eo a-bouez pe anat ar liamm-se. Chom a ra plaen a-walc’h an dasparzh etre ar liveoù yezh ivez.


Staget eo mat ar yezh doc’h ar metoù-se met penaos e vez barnet implij ar brezhoneg er bagadoù e-pad ar pleustradegoù?

Grafik n°39 : Ha graet a vez pleustradegoù e brezhoneg en o bagad ? :



Ne vez ket graet pleustradeg ebet e brezhoneg e Breizh àr-bouez un nebeud re e Kerlenn Pondi, pezh a zispleg an dregantad “Ya”, 1%.

Grafik n°40 : Frekañs klevout brezhoneg get pep soner en o bagad :




Gwelet a vez a-drugarez d’ar grafik-mañ penaos n’eo ket kustumet ar sonerion da glevet brezhoneg en o metoù, 253 hinienn a glev brezhoneg a-wechoù ha 78 biken. Tu zo da

liammiñ ha displeg ar fed-se get ar grafik n°29 bet studiet lec'h ma vez lakaet àr-wel an diglosiegezh er bagadoù. Dilaosket a vez buan a-walc'h ar brezhoneg get ar yezhourion pa vez tud a ne ouiont ket ar yezh-se. Domaj eo stadiñ seurt traoù pa vez gouiet eo aozet sonerezh Breizh-Izel àr ar brezhoneg dre anvioù an tonioù ha pozioù ar c'hanennoù.

Diaes a seblant bout evit pep soner klevet brezhoneg en e vagad. Sellomp a dostoc'h ma vez eus ar yezh e-pad kendarvoudoù ar bagadoù.


Grafik n° 41 : Sell àr sonerion àr implij ar brezhoneg e kendarvoudoù ar bagadoù hervez o live yezh :



Aozet a vez get Sonerion darvoudoù a hed ar blez, daou genskrivadeg a vez aozet evit ar pemp rummad mui ur nebeud konkourioù koubladoù daou ha daou strevet e pep lec'h e Breizh. An darvoudoù-se a vez implijet evit lakat ar gevredigezh en a-raok. A-c'houde un nebeud blezadù e vez klevet muioc'h mui a vrezhoneg a-barzh an darvoudoù-se. Met èl ma vez displeget get ar grafik a-us chom a ra c'hoazh un nebeud labour. Embannet a vez sklaer get ar vrezhonegerion oberiant penaos emañ skort implij ar yezh en emvodoù-se. Doc'h an tu arall eh eus 49% ag an nann-brezhonegerion a varn an implij-se pe sinifius pe bastus memes. Stadet a vez aze un troc'h etre ar vrezhonegerion oberiant hag ar re all. Hollad ar sonerion a gav memestra emañ skort an implij hag e vehe ret brasaat pouez ar brezhoneg en darvoudoù-se.

Studiet hon eus uheloc'h sell ar sonerion àr arwech ar brezhoneg en un doare hollek, studiomp bremañ o sell àr arwech ar yezh e bed ar bagadoù.

Grafik n°42 : Sell ar sonerion àr arwech ar brezhoneg e bed ar bagadoù hervez o live yezh :




Souezhus eo gwelet un diforc’h ken bras etre sell ar sonerion àr arwech ar yezh en un doare hollek hag e bed ar bagadoù. Pa oa 24,6% eus hollad ar sonerion a varne an arwech priorel en un doare hollek n’eus nemet 10% anezhe a gav emañ un dra priorel e bed ar bagadoù.

Diskenn a ra feur ar priorelegezh e pep live yezh rannet eo dre zaou evit rummad ar live “mat-tre” ha dre dri er rummadoù arall pa gresk an darvoud didalvoudus e pep live hag en hollad memes. Chom a ra tost digemm dregantad an darvoud “pouezus”. Kavet a vez memes treir hinienn a zo a-enep. Diaes tre eo kompren ha displegiñ un diforc’h ken bras etre disoc’hoù an daou c’hrafik.

Diskenn a ra ar feurioù, met ar brasañ a niver ar sonerion a gendalc’h a varniñ arwech ar yezh er bagadoù èl un dra pouezus memestra

Disheñvel eo sell ur strollad sonerion pa vez komz eus ar brezhoneg er bagadoù, evit klask mont donoc’h er studiadenn e vo studiet bremañ petra eo da vat sell ar sonerion àr implij ar brezhoneg er bagadoù

Grafik n°43 : Sell ar sonerion àr implij ar brezhoneg er bagadoù hervez o live yezh :



Stadet a vez get ar grafik diwezhañ-se ur gwir troc'h etre ar rummad live “mat-tre” hag ar re all. A-lies mat eo bet ar rummad live-se fallgalonet àr implij ar brezhoneg er bagadoù, padal emañ aze ar rummad get ar muiañ a spi àr implij ar yezh. Muioc'h evit an hanter a zo a-du evit lâret e ya implij ar brezhoneg àr gresk. Pa vez stadet get brasañ-niver ar rummadoù all penaos emañ sac'het an implij. Kavet a vez memes 22% ag an hollad a varn an implij àr zigresk.

Lâret hon eus en digoradur penaos e oa dipitet Vonig FRAVAL get implij ar brezhoneg e bed ar bagadoù ha dreist-holl get ar mank a oustilhoù efedus evit chañj penn d'ar vazh. Goulennet eo bet get an hiniennoù o deus repontet d'ar c'houlennaoueg, , dre ur goulenn digor, m'o doa un nebeud kinnigoù oustihoù evit kas àr-raok arwech hag implij ar brezhoneg e bed ar bagadoù. Setu un nebeud respontoù “pell-mell” :

“Un référent brezhoneg dans chaque bagad”

“Une communication entièrement bilingue”


“La diffusion d'un lexique basique relatif à la musique et aux échanges de bases.”

“Des formations ponctuelles de sensibilisation au sein des bagadoù, sous formes de journées d'initiation par exemple.”

“Former au breton les formateurs et autres intervenants pour le répandre dans les bagadoù et l'utiliser au maximum de façon interactive en créant des liens entre langue, culture, musique, technique musicale, histoire, etc. Faire comme les GAA en Irlande, faire comme le projet initial de Polig MONJARRET.”

Seblant a ra, èl ma vo gwelet àr ar grafik da heul, en deus brasañ-niver a sonerion ur soñj positivel ag ar yezh. Adlakomp en a-raok 52% ag ar vrezhonegerion “mat-tre” ha gav gete emañ implij ar brezhoneg àr gresk ha bodomp anezhe er grafik diwezhañ evit lâret e ya hag e yay implij ar brezhoneg àr uhelaat.

Grafik n°44 : Daoust hag e vehec’h a du evit deskiñ ar brezhoneg ma vehe roet kentelioù en o bagad



Klozadur

Metoù ar bagadoù a zo unan ag ar re dedennusañ e Breizh. Ne vez kavet aozadur ebet arall get kement a-dud e skeudenniñ gwel ar sonerezh Breizhat er vro. Souezhus eo gwelet penaos e chom c'hoazh ur metoù dianav d'an dud dre vank ar studiadenn. Diaes eo bet deomp kavout dielloù ha labourioù savet àr ar bagadoù hag e izili. En ur studial bed ar bagadoù hon eus merzet pinvidigezh sokiologel ar metoù resis-se.

Dre ar studiadenn-se hon eus bet tro da studial a-dost penaos e oa aozet ar gevredigezh, ha piv a oa e izili. A-raok kas da benn ar studiadenn-se e oemp pesimisit a-walc'h àr implij ar brezhoneg get ar sonerion. Disoc'hoù ar labour a stad n'eo ket ken fall ar metoù-se e-keñver komz hag implij ar yezh. Lakaet eo bet àr-wel e oa liammet ivez ar sonerion doc'h o yezh daoust dezhe bout diskiant àr an danvez. Mennet pe dedennet eo ar sonerion, hervez ar grafik da glask deskiñ ar brezhoneg. Mank a ra hiriv an deiz oustilloù evit gellet plantiñ muioc'h a vrezhoneg er bed-se. Stadet hon eus e oa niver ar vrezhonegerion àr-vrasaat a drugarez d'an hentadoù skol e brezhoneg. Erruet omp en ur c'hoazh hent pouezus evit amzer da zont ar brezhoneg er bagadoù. Ur rummad nevez a zo e tiwaniñ, ha deomp-ni vrezhonegerion ar bagadoù da genlabouraat asambles evit sevel ha kas da benn arwech an oustilloù-se. Pal kentañ ar studiadenn a oa stadiñ plas ar brezhoneg er bagadoù, evit ma vehe adimplijet ha dresit holl keñveriet ar sifroù-se get re nevez a vo dastumet a-benn dek vlez. Ha gwelet m'emañ aet àr raok plas, sell hag implij ar yezh er bagadoù. Savet hon eus ur labour troet à implij ar brezhoneg en ur metoù lec'h ma vez komzet gallo ivez. Dedennus a c'hellfe bout mont da studial kement mañ evit yezh all ar vro.

Ar labour-se a zo bet dedennus meur bet evidomp. Komprenet a vez gwelloc'h ur bed anavet ganeomp a c'houde gwezho bremañ. Kas a ra ar studiadenn-se ar c'hoant da vont pelloc'h c'hoazh get studiadenn ar bed ar bagadoù hag o liamm get an hengoun.

Lâret a oa bet get Polig MONJARRET e tistrofe loc'h ar vretonec pa veze bet kavet ur c'houblad soner e pep kêr. Mont a ra àr-raok niver izili Sonerion bep blez bremañ, ha ne vo ket pell niver da vout pouezusoc'h-pouezusañ, met penaos ober evit adkas loc'h un hengoun pa na vez ket mestroniet oustilloù an hengoun-se? Labouret hon eus bet àr implij ha sell ar sonerion àr ar yezh met petra eo o sell àr plas ar soner-zh hag an hengoun e Breizh hiriv an deiz?

Levrlennadur

Levrioù :

BROUDIC Fañch, *Parler breton au XXIème siècle, Le nouveau sondage de TMO-Région*, ed. Emgleo Breiz, 2009, 208 p.

BROUDIC Fañch, *Qui parle breton aujourd'hui ?, Qui le parlera demain ?*, ed Brud Nevez, 1999, 153p.

COLLEU Michel, BIGOT Laurent et LABBE Yvs, *Musque Bretonne Histoire des sonneurs de tradition*, ed. Chasse-Marée-Glénat, 2008, 200 p.

CARIO Daniel, *Le Sonneur des halles* , ed. Coop Breizh, 2005, 382 p.

CARIO Daniel, *La musique en bandoulière*, ed. Coop Breizh, 2005, 414 p.

HAMON Kristian, *Les Nationaliste Breton sous l'occupation* , ed. An Here, 2001, 271 p.

JONES Marie C., *La langue bretonne aujourd'hui à Plougastell-Daoulas* , ed. Brud Nevez, 1998, 71 p.

MORGANT Armel, ROIGNANT Jean-Michel, *Bagad, vers une nouvelle tradition*, ed. Coop Breizh, 2005, 160 p.

MORGANT Armel, *Kerlenn Pondi, Kalon ha begon*, ed. coop Breizh, 2013, 172 p.

OLLIVIER Steven, *Bodadeg ar Sonerion, L'assamblé des sonneurs, du musicien breton* , Centre de recherche d'histoire culturelle et religieuse, Université de Rennes 2, 1994, 206 p.

Kelaouennoù

Ar soner

Musique Bretonne

Lec'hiennoù internet

- Video 70 vlez Sonerion, [Sellet d'an 02/07/2017], à an URL <<https://www.facebook.com/sonerion/videos/1558736370844241/>>
- Sonerion, « Dossier de presentation », [Sellet d'an 30/06/2017], à an URL <<http://www.bodadeg-ar-sonerion.org/wp-content/uploads/2014/04/Dossier-de-pr%C3%A9sentation-sonerion.pdf>>
- Directe de Bretagne, Les taux de chômage en Bretagne [Sellet d'an 10/07/2017], à an URL <http://bretagne.directe.gouv.fr/sites/bretagne.directe.gouv.fr/IMG/pdf/directe_taux_de_ch%C3%B4mage_t1_2016-2.pdf>
- Evolution de la population urbaine et rurale en Bretagne entre 1954 et 2008, [Sellet d'an 12/07/2017], à an URL <<http://www.bretagne-environnement.org/Media/Donnees/Donnees/Evolution-de-la-population-urbaine-et-rurale-en-Bretagne-entre-1954-et-2008>>